



TONKAD 65

ABANNA YOUENN OLIER
HERVE AR ME LOEIZ LEMOINE

PREDER
Kaier 72-73
Mezheven-Gouere 1965

TONKAD
65

"Breizh hag ar bed"⁽¹⁾ eo unan eus ar pennadoù a levezonas ar muiañ emdroadur ar vuhez kefredourel e Breizh. Klozañ a ra gant ar gemennadenn : "D'al labour eta, kement hini a c'hall, da zegas da Vreizh arz, skiantoù ha furnez ar Bed, n'eo ket evit mougañ hor sevenadur-ni, evit e binvidikaat kentoc'h".

Ennañ emañ en egin al luskadoù liesseurt a ya d'ober ar preder brezhon evel m'en anavezzer hiziv. Tri rumm a rafen a-walc'h eus al luskadoù-se : 1. Luskad an droerion. 2. Luskad ar veizourion. 3. Luskad ar brederourion.

1. E penn rummad an droerion emañ Roparz HEMON e-unan, pa zegasas d'ar brezhoneg pinvidigezhioù eus holl sevenadurioù ar bed, adalek Iwerzhon betek Japan, Persia pe Rusia. Eilet ha heuliet e voe gant gwellañ lennegourion hor bro : ABOZEN, Youenn DREZEN, KERVELLA, KERVERZIOU, Pêr DENEZ, MORDREL, KLERG, HEUSSAFF, h.a. En o c'hichen e tleer renkañ troerion ar Bibl, Maodez GLANNDOUR ha KLERG en o fenn.

(1) Roparz HEMON, Breizh Ateo, Eost 1923; Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh, pp.19-30.

2. Meizourion eo ar skritell a lakaan, p'emaon o skritellañ, war ar rummad a stagas da bleustriñ war an tachennoù eo'hon digoret gant an droerion. Dre studiañ ar sevenadurioù all e teskjont studiañ gant hentennoù nevez ar sevenadur brezhon. Dre-se e voe ganet : a) ul lennegouriezh vrezhonek (skrid-varnouriezh, lizheregouriezh, kenlennegouriezh) merket gant labourioù ABBOZEN, Roparz HEMON, Rieg JESTIN, Youenn OLIER, Pêr DENEZ; b) ul lizheradur gouezoniell, Meven MORDIERN da dad dezhañ, en e vleufiv hiziv gant skrivagnerion niverus Hor Yezh ha Preder, gant imboure'herion KIS-SADED ha kelenn-erion SADED; k) ul lennegezh hanezleviadurel dindan anvioù Youenn OLIER, Pêr DENEZ, KLERG, h.a.

3. Rummad ar brederourion a ran eus ar skrivagnerion a gemer da selladoù selladoù ar re all, evit mont bepred en tu-hont war glask d'ar ster, d'ar poell, d'an anien. Ar brederourion c'hlan a glask ar poell evit ar poell, an anien evit an anien. Ar brederourion vrezhon peurliesañ n'en em zisc'hreont ket diouzh o damant broadel, hag o imboure'hioù zo doareoù da startaat ha da zoonaat an Emsav. Alese an nebeud a zifore'h a vez etre skrivagnerion ar rummad 3 ha re an is-rummad 2k. Diaes e ve o digemmeskañ bepred e kenlabourerion an Tonkadoù embannet gant Preder abaoe 1961.

Mar deus un danvez evit dedennañ prederourion hor bro ez eo an den brezhon. E-ser meur a bennad war Studi hag Ober e strivas Maodez GLANNDOUR da dermenañ an den brezhon evel ma trebad e pobl Vreizh dindan zis-leberadurioù ar sujidigezh; GAWAIN, en e Skiant Vreizh, a vraslagn dezvad prederouriel an emsaver evel den brezhon nevez. Hag hor remziad ne bella ket diouzh mennad hon diaraogerion.

Muzuliañ a c'hallomp an hent lezet e-biou abaoe 1920. Pa voe savet Breiz Atao edo ar Brezhon a-bezh, anavezour hag anavezad, e dalc'h ar Gall : "N'anavezomp ket ar Bed. N'anavezomp nemet Bro-C'hall" (Ur Breizhad oc'h ...p.25). Gant Gwalarn e teuas an dieubidigezh e par an anavezad : lekaomp Breizhiz da anavezout ar Bed ha dieubet e vint diouzh ar sujer o laka e stad "ur blantenn losket gant an heol ha breinet gant ar glav" (id. p.24). Dieubiñ e-keñver ar sellad avat n'eo ket dieubiñ ar sellour c'hoazh. Pa lavar Roparz HEMON : "Dieubomp ar Spered, ha dieubet e vo pep tra", (id. p.30), e vezer techet, o heuliañ ar memnoz displeget el linennoù a-raok, da gompren : "Dieubomp hor selloù,...". Nann, dieubiñ ar selloù zo ur gammed diziouerus, ur gammed nemetken eo neozh e-touez kammedoù all, pep hini o c'houlenn ken don awen, ken bras aked. Ar c'hemmañ-anavezour zo hepken lakaet gallus gant ar c'hemmañ-anavezad, n'eo ket un heuliad unhentek dezhañ. Ken aes eo tremen eus ur sujidigezh d'un all, ken diaes tremen eus ar stad suj d'ar rezid. Treiñ ur bobl bleget en ur bobl rez eo a-bell ar prederiusañ embregerezh a zo. Henezh eo pennaervez prederourion vrezhon hor c'hantved.

Tra ma astenne oberourion ar c'hemmañ-anavezad o selloù war ar bed holl, o tironedeañ kement pinvidigezh a gavent mat evit Breizh, e rank oberourion ar c'hemmañ-anavezour sankañ o selloù en den brezhon, - pobl hag Emsav, - a-benn gouzout pelec'h sankañ ar gontell etre bev ha marv ha reiñ frankiz d'ar bev.

Skrivagnerion Tonkad_65 a bled gant danvezioù milbell an eil re diouzh ar re all evit ur sell. Pe liamm a c'hall bezañ etre Dispac'h_Kuba ha Marv_Sokrates ? pe etre Keal_ar_Gwirvoud hag ar c'healioù Renkad_ha_Pobl ? Al lenner a gavo buan e pe lec'h e kej ar prederioù diseurt-se. Goulenn a reomp digantañ ergerzhout al lec'h-se, en em zerc'hel ennañ evit sellout a-nevez ouz ar bed. N'en devo ket kollet e boan.

ABANNA.

A B A N N A

A M P L E G A D O U

U R G E L E N N A D U R E Z H P O L I T I K E L

Goulenn a reer ur geennadurezh politikel evit an Emsav. C'hwitadenn an sozadurioù a felle dezho ober politikerezh brezhon hep kaout a geennadurezh, pe zoken plediñ gant Breizh hep ober a bolitikerezh, a laka ar goulenn-se diouzh ar c'hiz.

Penaos sevel ur geennadurezh ? Hag an ober eo a vo tad dezhi ? Pe hi a vo mamm d'an ober ? Hag-eñ ne vez ket endeo ur geennadurezh e pep ober ? Ha pep geennadurezh, hag-eñ n'eus ket un ober anezhi endeo ? Reoù 'zo a ginnig ur steuñv hollek eus ar Stad Vrezhon, met n'ouzont ket penaos mont war an dachenn. Reoù all a ya war an dachenn, met ne welont ket penaos mont pelloc'h. Nag an eil re, nag ar re all ne gavont penaos kejañ. Ha koulskoude an eil re hag ar re all a ranko kejañ mar fell dezho dienkañ an Emsav. An notennoù da heul zo o fal prientiñ ar gejdigezh dre episaat krefen 'zo eus ar gudenn. Tennet int

eus kendivizoù ha kenskriverezh; o sinañ a ran, fellout a ra din avat merkañ ez int frouezh ar c'henlabour.

Evit neb a bled gant Breizh ez eus daou zoare da sellout ouzh an traoù. Ar sell kentañ, a rafen ar sell-arveziñ anezhañ, zo sell an hanezour o teskrivañ stad an traoù e Breizh, o stad-egañ al luskadoù, o reiñ d'an Emsav ar plas en deus e-touezh al luskadoù-se. Ar sellour-arveziñ en em laka en diabell d'e sellad, digrap diouzh an ober, e-maez a levezon an darvoudoù.

An eil sell, a rafen ar sell-buhezañ anezhañ, zo an ober graet sell; sell ar c'hoarier mell-droad war an dachenn; sanket gwezh dre e benn-sellout, gwezh dre e benn-sellad en danvez, en abadenn, a zo oc'h emdreññ gantañ.

Ken ledan ha ma karer eo dremmwel ar sell-arveziñ. Berrwel eo ar sell-buhezañ; mar deo strizh e zremmwel avat, ez eus dezhañ ur vent n'en deus ket ar sell-arveziñ : an donder diouzh tu an dazont; muioc'h, trevour an dazont eo, ha kentañ-perc'henn war un tared anezhañ. Emañ sell an diazezourion sanket en dazont, o sevel ennañ an traoù fetis a ziwano tamm ha tamm gant ar bloavezhioù.

Ne c'hall ket avat ar sell-buhezañ tremen hep skoazell ar sell-arveziñ. E verrweled bepred gwaret gant nerzhlinennoù ar gwered fetis a rank bezañ klokaet, reizhet, kresket gant gweled sklaer ha ledan ar sell-arveziñ. En un Emsav e vo tud douget muioc'h d'ar sell-arveziñ, tud all douget muioc'h d'ar sell-buhezañ.

Merkañ a ran diouzhtu daou fazi a c'hell bezañ graet, - hag a vez graet, - dre gannlec'hiañ an ober e-keñver an daou zoare sellout. Ar fazi kentañ eo lakaat an ober e dalc'h ar sell-buhezañ nemetken; fazi an hini a ro e vuhez a-bezh da ampellat marv ar brezhoneg en e gêriadennig. Ar fazi keñverek

eo lakaat an ober e dalc'h ar sell-arveziñ nemetken; fazi an hini a dremen e amzer o pouezañ c'hafisoù Breizh da zreistbevañ, c'hafisoù an Emsav da vezañ trec'h. Ar sell-buhezañ ne c'hall ket tremen hep sklerijenn ar sell-arveziñ; ar sell-arveziñ ne c'hall talvezout nemet dre hantererezh ar sell-buhezañ. Ur varn reizh ne c'hall bezañ douget nemet gant un den a zo war an dachenn endeo.

Arabat e ve lakaat etre arveziñ ha buhezañ an enebadur klasel a lakaed etre anaout hag ober. Pep hini eus an daou zo war un dro un anaout hag un ober, ur praksis, pe, evel ma lavaromp, ur goueznid. Pep hini zo klok evel framm hiniennel; diglok avat da dizhout ur pal politikel. A-ouez ar fetis e chom ar buhezañ, nemet e tenn e zremmwel da strishaat dizehan; an arveziñ a ren war e zremmwel, nemet e tenn endalc'h e zremmwel da zifetisaat dizehan. Ur meni Pennaenn ar Arvar zo aze : pa starta ar buhezañ e tispisa an arveziñ; pa spisa an arveziñ e tistarta ar buhezañ. Dav eo paouez a ober ur peurvoud eus ar buhezañ, pe eus an arveziñ, pe c'hoazh eus ar praksis marksour pa venn bezañ furm nemeti o c'hejidigezh. Hor c'hentañ kammed eo anavezout ar buhezañ hag an arveziñ pep hini evel diglok, eleze evel digor.

Ur geledadurezh politikel, unan a zaou, pe a verko palioù nes, fetis ha darnel, da seveniñ raktal, dezho enta un derez bezusted uhel; pe a raktreso palioù hollel, da vezañ sevenet a-benn bloavezhioù, dezho un derez bezusted izel. Me oar, ur gudenn a skiant politikel eo bezañ gouest da brientiñ bloavezhioù

en a-raok ur sevenadenn hollel, o tiogeliñ dezhi ur vezusted uhel. Met dres, kacout skiant politikel zo gouzout ez eo an ober politikel un ober digor, dezhañ diazezoù o kemmañ stumm, palioù o kemmañ dremm dizehan. Diazezoù ha palioù tud vBreiz Atao n'int ken hon re; o sell-arveziñ zo hogos estren deomp; o sell-buhezañ a van nes d'hon hini, ha dre-se omp an hevelep broadelourion hag int. S.A.D.E.D. a voe ganet diwar geledadurezh Youenn OLIER o raktresañ ar Stad Vrezhon; e-keñver ar raktres-se hollel, pell ha difetis, e tiwanas S.A.D.E.D. evel un tres darnel, nes ha fetis. Mar klote o sell-arveziñ e chome pell sell-buhezañ raktresour ar Stad Vrezhon diouzh sell-buhezañ diazezoù S.A.D.E.D.; ha, da heul, en dije Youenn OLIER gallet chom hep merzhout emañ S.A.D.E.D. war hent ar pal arvezet gantañ; dres evel ma chomas Tangi MAL-MANCHE hep anavezout edo Gwalarn o vuhezañ e arvezadenn. Kement-se evit diskouez e c'haller kenvuhezañ hep kenarveziñ, evel kenarveziñ hep kenvuhezañ, hag e vez ret alies ur skiant politikel lemm evit dizoleiñ al liammoù a zo etre ar mennoz hag ar vuhez, etre ar preder hag an tonkad.

o
o o

Digor eo dre natur framm an ober istorel. Evit an abeg ma'z eo ur framm amzeriek. Hor reiz ne c'hall ket diraez an amzer evel amzer; hor reiz ne c'hall savelañ nemet lunegorennoù : er frammoù arvezet gantañ e vez an amzer pe argant-vezet evel egorenn (egorennet e vez an amzer) pe lakaet krenn er-maez (ec'hamzeret e vez an egor). E gerioù all, an amzer

ne c'hallomp ket ergorañ outi evel ma ergoromp ouzh an egor; ne c'hallomp savelañ an amzer evel amzer nemet en hon dangorelezh, eleze dre ar buhezañ. Ne c'hall morse ar reiz kantvout ur framm amzeriek ennañ e-unan; dre-se ne c'haller morse en em dennañ eus an istor evit ergorañ outañ, an emdennadenn o vezañ istor hec'h-unan; ne c'haller ket sevel ur geledadurezh evit an istor da zont hep ma ve ar geledadurezh-se lodek en istor he mare.

Se n'eo ket lavarout e vez aner sevel geledadurezhioù; hogen ret-mat eo anavezout petra eo ent-tonkadel ur geledadurezh. Geledadurezh Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh zo hiziv hanezel hag ar pennañ pal arvezet ganti (disubiñ Breizh dre he lennegezh) a oa fazius; hogen ar framm-buhezañ savelet e-ser ar geledadurezh-se n'en deus graet nemet kreskiñ ha kreñvaat abaoe : dioutañ e sav kement sevenadenn vrezhon a zo hiziv an deiz. Ar geledadurezh a dizh palioù disheñvel diouzh an hini a verke.

Dre-se, ur geledadurezh politikel ne c'hall bezañ nemet digor ivez. E gwir, pep geledadurezh; zoken mennet start da vezañ klok ha kloz, gant ma ve danzeet war ur prantad hir awalc'h, a gemer dresi hec'h-unan ur furm digor. Ur Breizhad oc'h ... a ro deomp ur skouer a geledadurezh o tioraat : keñverioomp ar pennadoù diwezhañ gant ar re gentañ. Ur geledadurezh a c'hall bezañ e dislavar furmel ganti hec'h-unan dreuz d'ar bloavezhioù hep bezañ digempeoll. Estaol eo d'ur framm amzeriek, hag he c'hempoell n'eo ket ar c'hempoelloù a gavfed enni diouzh un troc'h treadegel pe kennebeut-all diouzh troc'hoù kevadegel. He c'hempoell ne c'hallomp ket barn war-

eeun, pa n'omp ket evit kantvout ar framm amzeriek ma'z eo-hi an eztaol anezhañ; ne c'hallomp he barn nemet war he dilesroez, da lavarout eo war he reizhded vuhez. Da skouer, pa ginnig Roparz HEMON er pennad Ar Vuhez hag al lennegezh (1925) al lennegezh evel un doare da dec'hout diouzh ar vuhez kriz war-du an huñvre frealzus, ez eo faos e dezenn, n'eo ket hepken dre ma ve digempeoll evit ar reiz diouzh peurrest ar geleñnadurezh, hogen peogwir ez eo direizh e-keñver ar buhezañ : emzalc'h ar barzh Pêr HELLAS eo, skouer a vuhezañ brezhon andiles. Pa lavare Roparz HEMON e 1927 : "Saveteet e vo Breizh (..) en deiz m'hor bezo gwellaet hor yezh, graet hol lennegezh,..." ez eztaole un digempeollder diouzh an troc'h treadegel; kempoell-rik e oa avat diouzh ar framm amzeriek kev an hent ganedigezh an den brezhon nevez e oa.

Ur geleñnadurezh hollal, klok, peurgempeoll diouzh ar sell-arveziñ a c'hallio lorbñ ar spered; ne bado ket pell avat kent disac'hañ a-vloc'h, o tiskouez hec'h andilesroez. Ur geleñnadurezh diles a vo diglok, darnel, o tiskouez digempeollderioù; hevelep digoried, pell diouzh bezañ ur waded, a vo ur merk eus he gwirionded.

Ur geleñnadurezh ne c'hall ket bezañ kloz diouzh tu an ober, na bezañ klok heptañ, na bezañ distag dioutañ : geleñnadurezh un emgann ne c'hall diwanañ nemet ur wezh krog buhezañ an emgann, atav dre an abeg ma'z eo an ober istorel ur framm amzeriek, hag ur framm amzeriek ne c'hall ket bezañ anavezat eus an diavaez, - peogwir n'en deus ket a ziavaez.

)o((

Y O U E N N O L I E R

G O U E N N, R E N K A D H A S E V E N A D U R

Degaset on bet da sevel ar pennad-mañ diwar brederiañ a-zivout istor an Emsav etre an daou vrezel. Darn eus ar stourmerion d'ar mare-se a zo bet douget d'ar geleñnadurezh a oa o ren e Bro-Alamagn d'ar c'houlz-se, me 'fell din komz eus ar genelwerinelouriezh.

Ne gav ket din ez eo dedennet tre ar re yaouank a hiziv gant hevelep geleñnadurezh ha na zedennas ar speredoù neuze nemet en abeg da c'hañs dreistfaltazi ar "c'hoarier poker" a oa e penn Bro-Alamagn d'an ampoent. Evelato e c'heller soñjal ez eus un darempred bennak etre gouennelouriezh ha broadelouriezh, pe kenelouriezh evel ma lavar darn bremañ hag un dra vat e c'hell bezañ imbours'hañ hag-eñ e teree - pe e terefe - ar genelwerinelouriezh ouzh emsav Breizh.

Klask a raimp eta burutellañ ar geleñnadurezh-se ha war un dro ensellout ha barn an doareoù-ober hag an hentenoù a zo bet arveret gant an dalc'herion anezhi da ziazezañ o riez, koulz hag ar riez e-unan o deus diazezet.

I

Ar genelwerinelouriezh a zo da gentañ un naturelouriezh eeun a-walc'h. Evit darn e kav he gwirizienn e menozioù Darwin ha dreist-holl e meizad ar stourm-evit-bevañ : skarzhet hag enlec'hiet eo tamm ha tamm ar gouennoù hag an isouennoù disterañ ha gwanañ, gant ar gouennoù hag an isouennoù kreñvañ ha gwellañ. Hag ar stourm an hini eo a ro tu da dermeniñ pere e vo ar gouennoù trec'h. Kement-se a zo diuzouennerezh naturel. Evel-se eta en em laka ar genelwerinelouriezh war dachenn ar bedemdroerezh. Ur bedvezadur a oa mennet da gevezañ gant hini ar varksourion a oa anezhi (gouzout a reer e tistaol ar re-mañ Darwin evit degemer Lamarek hag e vezad a amozerezh ouzh an amva da ziskleriañ ar bevemdroerezh).

Enneizet e oa er c'houl-laka e oa ar gouennoù digemmesk ar re wellañ, pe da vihanañ, ha kentoc'h, ne c'helle ur ouenn mirout he dreistelezh hag he zrec'halezh nemet diouzh ma vire he glanded hag hec'h anterinded, pezh a c'houl-laka e oa breinet perzhioù ar ouenn gant pep hironadur.

o

Seurt kelennadurezh ne c'helle kemer ur ster politikel nemet e degouezh ur ouenn ispisial a dud. Ret e oa spisiant peseurt gouenn dud he doa perzhioù ur ouenn drec'h. Sed pezh a reas ur gall hag ur saoz pa rojont da gredañ d'an Alamaned e oa o gouenn-int - pe kentoc'h hini ar C'hermaned - ar ouenn dibabet. Anv ar Gall a oa Joseph-Arthur de Gobineau a embannas etre 1853 ha 1855 un "Essai sur l'inégalité des races humaines" hag hini ar Saoz Houston Stewart Chamberlain a voules e 1898 "Grundlagen des neunzehnten Jahrhunderts" a reas berzh dreist-holl e gwirionez dindan ren Hitler : 250 000 skouerenn anezhañ a voe gwerzhet e 1938. An daou levr-se a rae o daou eus gouenn an Alamaned ur ouenn a vistri, dreist-holl dre ma oa chomet digemmesk. Ret eo notañ koulskoude e laka Chamberlain ar Yuzevion war ur bazenn gant ar C'hermaned : ne onnt ket disterc'h egeto, disheñvel ne lavaran ket.

Menoziou danheñvel a gaver e-barzh levr Rosenberg, prederour a gefridi an emsav kenelwerinat "Marzhvoud an ugentvet kantved" a glasker diskouez ivez dreistelezh ar ouenn hanternoz. Hitler ha n'en deus ket e-unan skrivet ul levr aes da lenn a zisklerie n'oa ket tu da lenn hini Rosenberg, pezh na viras ket ouzh ar skrivagner a werzhañ 500 000 skouerenn anezhañ en ur ober un nebeut bloavezhioù.

o

Kenlec'h istorel an emsav hag ar gelennadurezh kenelwerinat.

Graet he deus berzh seurt kelennadurezh e Bro-Alamagn dre ma voe skignet en ur vroad a oa bet dismegañset e-pad kantvedoù, dreist-holl dre berzh ar C'hallaoued, abaoe feur-émglev Westfallia hag a-c'houde hini Versailles da zivezhañ holl, pergen. un doare emzalc'h a gilstourm, a zial hag a zigoll evit renkedoù emskiantek ar c'houl-lakan ez eo bet eus o ferzh diogeladur dreistelezh o gouenn. Broudet eo bet an emzalc'h-se e-hend-all, ken gant berzhioù-mat ken gant droukverzhioù ar stad alaman kreizennet, gant ar berzh-mat etre 1871 ha 1914, ha gant an droukverzh adal 1918. An hevelep emgav a zismegañs a-hend-all a ziskler perak ez eo bet degemeret mui pe vuil en ur stumm all e-touez darn eus izili an emsav etre an daou vrezel.

Burutelladur

Kudenn dreistelezh ar gouennoù a zo moarvat ur falskudenn ken e-keñver emdroerezh ar gouennoù loened - gouennoù zo a zo aet da get dre ma oa bet kemmet trumm o amva - ken e-keñver gouennoù an dud. Evel ma verke Mataliz e-barzh "War-du ar pal" a-rack ar brezel diwezhañ, meur a vezad a zo endalc'het er ger "gouenn". Lakaomp ez eo dre vras legaderezh ar perzhioù speredel ha korfel. Diouzh a c'heller barn avat, ez eo kevatal war-bouez nebeut perzhioù ha gallusterieoù speredel ha korfel an holl ouennoù tud. Dre skiant-prenet e ouzomp e c'hell ar re zu, da skouer, tizhout ken uhel deskadurezh ha sevenadurezh hag ar re wenn, pa vez roet tro dezho.

A zo gwashoc'h, pezh a anver dreistelezh ar ouenn wenn ned eo bet e gwirionez nemet dreistelezh ur rumm anezhi, hini ur renkad evit komz resisoc'h, hini ar vourc'hizion o deus savet

sevenadur danvezel ar C'hornog abaoe daou gantved bennak.

Amañ eo e weler pegen amsteriek ha forc'hellek eo ar meizad a zreistelezh ar gouennoù. Rak diazezet eo an dreistelezh-se war ur skeuliad-talvoudoù a zo arbennik da bep sevenadur. Da lavarout eo e tibenn empennadur an dreistelezh diouzh ur bedvezadur bennak.

War a seblant, an holl re o deus kanmeulet dreistelezh Kornogiz abaoe ur c'hantved - kempred eo e gwirionez gouennelouriezh ar re wenn gant emled Europiz war an holl gevandirioù - o deus diazezet o barnadenn war diorroader skiantoù an natur, ar greanterezh hag ar c'halvezerezh en hor broioù. Ned eo bet gallus avat ar c'hresk souezhus-se nemet a drugarez da emzispieg ur speredegezh dirvoudkar ha digravezal en Europa penn-da-benn adal amzer an azginivelezh. Emdroet he deus ar speredegezh-se a-dreuz emsav ar filozofed betek skiantelouriezh an XIXvet kantved. Amañ e ranker merkañ daou dra. N'eo bet ganet ha n'eo deuet da vat an emsav-se nemet en ur c'hendere strizh-tre a dud, hini ar vourc'hizion desket. Ha d'an eil, ar renkad-se a oa skignet en holl vroioù. Dreistelezh ar renkad-se, eta, ne oa ket ur fed hêrel pe ouennel - ne c'helled ket diforc'hañ da vat kendere an noblañsoù-bourc'hizion diouzh ar peurrest eus ar boblañs - unan sevenadurel ha kevredigezhel ne lavaran ket. Forzh penaos e oa diorroader ar spered dirvoudkar ha skiantel da gompren e framm hollek ar sevenadur kornogat hag e zo diazezet e-unan, a-benn ar fin, war an hensevenadurioù kreizdouarek gresian-roman levezonet gant ar gristeniezh. Kement-se ne c'heller ket nac'hañ pa studier istor Europa. E gwirionez ez eo ar sevenadur un diskouezataenn spered a vez skignet hag amprestet dre hentennoù bredkevredigezhel, ha n'eo ket gouennel pe hêrel.

Ar pezh a zo a-bouez amañ hag a ranker gouverkañ eo ez eo stag ur sevenadur, e-giz ma lavaran, ouzh ur skeuliad-talvoudoù, ouzh un urzhaz speredel, da lavarout eo ez eo dines o c'henveriañ kenetrezo. Daoust hag ur c'henvezul bennak a zo, da skouer, etre sevenadur Europiz ar Grennamzer pe hini Indeziz nevez zo a dremene an danvez da netra hag hini Kornogiz a-vremañ a dremen an danvez da holl ? A-raok barn ur sevenadur - hag ustad pe isted ar re o deus her c'hrouet - e vefe dav da gentañ termeniñ uhelskouer an den hag ar sevenadur e-unan. Eleze e tleomp ober un dibab prederouriezhel.

Kemeromp avat ur skouer resisoc'h c'hoazh ha tostoc'h

deomp, hini sevenadur Breizh en XVIIIvet - XIXvet kantved ha kevveriomp anezhañ ouzh an hini a oa oc'h emdreiñ neuze e Bro-C'hall. Ma tegemerer savbont an evedusted danvezel dre vras, hini ar c'henurzhierzh hag ar sevenerezh e ranker anzav e oa sevenadur ar Vretoned hag eñ maezel ha kravezel nemetken distro-oc'h a gals neuze eget hini ar C'halloued o doa abaoe pell ur sevenadur kêrel hag a oa o tiazazañ d'ar c'houlz-se ur sevenadur skiantel. Evit diskleriañ an devoud-se hervez kelennadurezh ar ouennelourion e tleomp neuze anzav ivez ez eo Breizhiz ur ouenn a-is. Anaf eo koulskoude n'eo ket gwir. Pezh a ziskler gwall-stad ar Vretoned, o izelled, n'eo ket o gouenn he deus kement a berzhioù hag a c'hallusterioù hag ar gouennoù all hogen o emgav kevredigezhel dre vras, enket ha ma cant d'ur renkad kouerion diaesk, diframp pe framm gant bourc'hizion c'hall estren outo. A-se, un dielfennadur eus emgav kevredigezhel ur bobl a c'hell hepken diskleriañ he stad. Bez' e c'heller eta lavarout n'he deus kelennadurezh ar ouennelouriezh talvoudegezh ebet evit diskleriañ an devoùoù a sevenadur⁽¹⁾.

Ur skoueriadur all a gadarnay ar varnadenn-mañ, hini ar Yuzevion hag ar C'hermaned e Bro-Alamagn. Bez' e c'hellfed lavarout e oa ar Yuzevion evit un darn vat ur ouenn a-us da hini ar C'hermaned peogwir edont lec'hiet war ur bazenn uheloc'h er gevredigezh peurlvinañ : tizhet o doa dere'hel postoù ha kargoù eus ar pouezusañ e Bro-Alamagn. Hogen, a-benn ar fin, ne c'heller ket diskleriañ o dreistelezh gant o gouenn hec'h-unan hogen gant o lodegezh e brientoù renkad ar vourc'hizion e Bro-Alamagn (deskadurezh, glod, h.a.). Frouezh o stad kevredigezhel e oa o dreistelezh etc. A-hend-all ez eo ken anaf all ne oa ket o stumm-korf nag o yezh evit o diforc'hañ kreñn diouzh an Alamaned all peurlvinañ; o c'hravez, ne lavaran ket, da lavarout eo ur perzh speredel ha sevenadurel.

(1) Ne vezn penaos e oa dibocell a-barzh Brezhoned degemer ur gelennadurezh ha na zalc'he kont nemet eus stad ar sevenadur kempred e-lec'h na cant, a-benn ar fin, evel pobl, nemet goudu "Untermenschen" rak an dalc'h, hervez ar gelennadurezh-se, eo e tle ar gouennoù a-is chom da viken ar stad m'emañ, hep gallout emdreiñ, o vezañ ma'z eo ar ouenn un devoud stabil ha tonket da chom digemma da viken.

Lavaromp ivez evit echuiñ e kase hevelep kelennadurezh war-eeun d'an diuzouanerezh ha n'eo bet implijet nemet evit al loened hag a-benn ar fin d'ar gouennoù kevanaozal gant arakadur an hêroniezh.

Merkomp a-hend-all, o tremen, e temfe ur geleannadurezh a seurt gant ar ouennelouriezh da surant beli renkadoù 'zo evel hini an noblañsoù, da skouer, ha na zimezont nemet kenetrezo. Ar skouer diwezhañ-mañ a-hend-all o ziskouez moarvat e c'hoari an hêrelezh ur roll e legadurezh perzhioù bred ha kalon 'zo hogen ivez n'eo ket an hêrelezh-se an devoud pouezusañ, - ar c'helo'hiadur e-unan hag an diorroadurezh, ar glad hag ar binvidigezh, h.a. ne lavaran ket, - eleze devoudoù bredkevredigezhel bepred.

III

Tu a zo bremañ da studiañ ar vuhezouriezh kenelwerinat he deus dedennet a-wechoù tud a oa war glask un uhelvennad. Emañ orin ar vuhezouriezh-se er romantelezh alaman eus an XIXvet kantved, Lakaomp, Wagner, dreist-holl Nietzsche, daoust ma n'eo ket sur o defe ar genelwerinelourion poellet ervat kemennadurezh ar skrivagner-mañ. Hitler, avat, e-barzh e levr "Mein Kampf" a ouestl meur a bennad d'an harozerezh "das Heldentum", d'an emberzh, da sturienn ar rener, ar blenier, ar "Führerprinzip", diazezet war an atebeged hag enebiañ a ra an "hinienngarouriezh" -se ouzh "hellunrezadeged" ar varksouriezh hag ar gomunouriezh ha na zegemeront nemet an engroez da wirvoud nemetañ.

Lavaromp da gentañ ez eus dislavarañ etre ar sturiennoù kaer-mañ ha diazeze ar ouennelouriezh end-seun. N'eus netra a ve muioc'h tonket eget an hêrelezh. Hervez al lezennoù anezhi ne c'hell an den bezañ nemet ur c'henderc'had ha n'en deus rezid ebet. En em gemmeskañ a ra ar ouenn e gwirionez gant an engroez.

Pa lenner piñ avat ar pajennadoù a zo bet gouestlet gant Hitler d'ar c'hudennoù-se e verzer e pouez hemañ kalz mui war vertuz ar sentidigezh eget war hini ar gourc'hemennerezh, ken en em c'houlenner a-benn ar fin hag-eñ n'eus ket un elfenn relijiel iskis a-walc'h er sturiennoù embannet ha kanneulet gant diazeze ar genelwerinelouriezh; pennaenn an emberzh hag an emroerezh klok d'ar rener - ri pe vrenin - a denn d'an hini a c'houlenn ar relijion digant an den a gredenn a-benn en em reiñ da Zoue ha sentiñ outañ penn-da-benn. Soñjal a-walc'h

a c'hellfed ez eo ganet, evit darn, entan politikel diseurt an Alamanned en amzer ar genelwerinelouriezh diouzh ur gred relijiel dizimplij. Kontet eo bet din, da skouer, istor un harzlammer alaman e-pad ar brezel a zisklerie ur wech en doa kredet bezañ goursavet d'ar seizhvet neñv en deiz m'en doa Hitler startet e zorn d'e drugarekaat evit ur gur bennak. Ret eo merkañ ne gaver ket skouerioù a emberzh politikel-relijiel e-touez ar genelwerinelourion hepken hogen e-touez ar gomunourion o-unan a rank lakaat o bezoud hag o buhez a-bezh e servij o uhelvennad - hag er-maez eus ar C'hornog, e-touez levierion ar c'hirri-nij-emplazhañ e Bro-Japan e-pad ar brezel diwezhañ, pe, nevez 'zo, en un endro all hag en ur stumm all, er Vietnam, e-touez ar Vonzed en em zeve war al leurgêr da vrudañ o menozioù.

Seurt emzougou avat a c'heller burutellañ e meur a geñver. Da gentañ an uhelvennad e-unan. Neb a zispriz e vuhez hag e bersonelezh - lakaet en defe ar gwir d'henn ober - o sentiñ betek ar marv, a zispriz ivez alies buhez ha personelezh ar re all. Arallekaet eo ar stourmerion e-keñver ar rener. Hemañ hepken a c'hell kaout ur rezid gwirion. Hag ar rezid-se a vez arveret diwar goust an isurzhidi. Diboell eo komz eta eus hinienngarouriezh peogwir ne dalvezo houmañ nemet evit un nebeudig a dud diwar goust an darn vrasañ. Un degouezhadenn damheñvel a c'hoarvez en armerzh pa c'houlenn an embregour ur frankiz ha na c'hell bezañ arveret da vat nemet diwar goust e implijidi.

Ne nac'han ket e ranker a-wechoù degemer un urzh strizh e degouezhioù resis, e-pad ar brezel, Lakaomp, hogen seurt urzh a zle bezañ kalvezel hepken ha ne c'hell ket enstummañ askre an dud.

o

Diouzh ur savboent all e c'heller kavout abeg en empennadur ar politikerezh gant ar genelwerinelourion. Ar re-mañ o deus kemmesket politikerezh gant kravez ha buhezouriezh ha roet da hennesez un dalvoudegezh dangorat evit an dud. Ar politikerezh avat n'eo ket un tu d'an hinienn d'en em seveniñ, d'en em salviañ, mar karer, un tu da wazañ, da servijout, ur gumniezh a dud ne lavaran ket, un tu da aotren d'an holl izili anezhi

gwitibunan bevañ evel tud ar muiañ ar gwellañ. Eleze ez eo ar politikerezh ur "wazoniezh" da gentañ penn; ne c'hell ket sellout ouzh ur bobl pe un engroez evel un danvez da verat; arabat eo dezhañ klask o gwallañ. Kement-se a c'houlenn digant ar stourmer perzhioù disheñvel diouzh re an haroz hag a zo tostoc'h da hini ar c'helanner en em harp war boell an dud evit o sklerijennañ hag o c'hendrec'hiñ. E nep doare ne c'hell ar stourmer breizhat bezañ ur sorsar a garfe sammañ e youl war dud strobinnellet gant ardoù ur bruderezh o tennañ da vreoù un hudouriezh bennak. Er c'heñver-se e tle ar stourmer breizhat bezañ disheñvel krenn diouzh ar stourmer kenelwerinat ergentaou.

III

Ne gredan ket kennebeut e c'hellomp tennañ ur gentel bennak diouzh henterezh politikel ar genelwerinelourion.

Pa lenner "Mein Kampf", dreist-holl ar pennadoù kentañ, e vezer mantret o verzout pegeñ pell e oa ar c'hudennoù politikel e oa nec'het Hitler ganto diouzh ar re hon eus da ziskoulmañ e Breizh. Hag eñ German en un impalaeriezh liesvroadel e klaske Hitler suraat brientoù ha dreistwirioù e vroadelezh e diabarzh an impalaeriezh-se end-eeun, un tammig e-giz ma c'hellfe ur Gall henn ober en ur Vro-C'hall gevredadel. Gwashoc'h c'hoazh e voe e emzalc'h pa voe erru e penn ar stad alaman. En em zougen a reas neuze evel m'en defe gallet ober an impalaerelour gall gwaskañ, o sujañ hag o tispenn broioù hervez e froudenn. Pezh a savas a-benn ar fin e voe un impalaeriezh a 100 000 000 a dud a zlee kreskiñ d'e soñj betek 150 000 000 a dud. Etre seurt impalaeriezh hag ur vroad a 3 000 000 a dud kollet ganto o yezh hag o emskiant vroadel ne oa e gwirionez keñver ebet.

Kentel ebet da dennañ diouzh an hent en deus heuliet an emsav kenelwerinat da gemer ar galloud. Notomp, da gentañ, e-ser se, penaos en deus klasket Hitler ober da gentañ gant ar rannvroelouriezh evit diazezañ un impalaerelouriezh onebet krenn ouzh houmañ; arnodet en deus implijout stern ar stad

rannvroel a vBayern evit alcubiñ ar stad-kreiz alaman penn-da-benn, dres evel ma arveras ar roueclerion c'hall emsaviñ Vreizh e-pad Dispac'h 1789 a-benn adsevel ar roueclerzh c'hall e Paris.

A-c'houdevezh ez eo deuet Hitler a-benn da dapout ar veli hervez al lezenn, oc'h en em harpañ war nerzhioù hag emgavioù n'eus ket bet ha ne vo biken anezho e Breizh. Dre vras ez eo bet Hitler ampart a-walc'h evit gonit sikour ar strolladoù hengounel a zehou a oa bet gwall gerseet war-lerc'h ar brezel kollet, hag ivez war ar milionoù a vourc'hizion vihan rivinet gant tanavadur ha kozhadur ar Mark. Ar seurt strolloù-se, avat, e Breizh a zo gall. En em harpet en deus ivez war ar spont rak ar gomunouriezh, e-giz ar faskidi italian en e rak : klasket o doa ar gomunourion er bloavezhioù kent diazezañ o gouarnerezh dre an nerzh hag an dispac'h e meur a vro. Ar seurt spont avat ne gaver ken e Breizh ken, ha mar bije anezhi e c'houlennje harp kentoc'h digant ar c'hostezennoù gall a-zehou. Tennañ en deus e vad diouzh enkadenn an armerzh-kevala a lakaas dilabour milionoù a Alamaned. Deuet eo avat ar gevalourion a-benn bremañ da reizhekañ un tamm bennak o arboellerezh ha kredapl eo ne vo ken gwelet seurt enkadennoù-meur. A-hend-all, un enkadenn armerzhel a zo e Breizh moarvat hogen n'eo ket loskus dre ma kav un aohapadenn en divroerezh. Dre vras eta ne c'hell ket Breizh en em harpañ war ar renkadoù hag an emgavioù politikel o deus roet tu d'ar genelwerinelouriezh ha da emsavioù all d'ober berzh.

Pezh na gomprenet ket mat a-wechoù e Breizh eo n'hon eus ket da gregiñ e stur ur stad hogen da sevel anezhi penn-da-benn. N'eus keñver ebet eta etre Breizh ha Bro-C'hall pe Vro-Alamagn. An holl dispac'hoù a zo c'hoarvezet en Europa abaoe 1789 - nemet hini Iwerzhon - a zo c'hoarvezet en ur gêrbenn hepmuiken. Netra heñvel e Breizh peogwir n'hon eus na kêrbenn na gouarnamant. Anat eo d'ar c'houlz-se e tleomp klask hentenoù disheñvel krenn.

IV

Mat e vefe bremañ reiñ ur ster da emsavioù e-giz an hini kenelwerinat hag an hini fasket. Kemstur eo an emsavioù-se e meur a geñver d'an hini a zegasas an trec'h d'ar gomunourion e Bro-Rusia adal 1917. Ret eo kounañ penaos int bet diazezet pe renet er penn kentañ gant tud a zeue eus ar werin pe da vikanañ, a oa bet dedennet mui pe vuñ gant ar sokialouriezh. Kement-se a zo gwir e Bro-Italia e-lec'h e oa Mussolini un ez-varksour. Gwir eo ivez e Polonia adal 1926 e-lec'h e oa Pilsudski ivez un ez-sokialour. Er strollad kenelwerinat e-unan e oa darn eus ar stourmerion hag an diazeourion a-du krenn gant ar sokialouriezh, Georg Strasser, da skouer : c'hoarvezet eo gant Goebbels e-unan dremmañ d'ur mare ouzh ur c'henlabour bennak gant ar gomunourion a-benn diskar ar gevallouriezh (a-raok dezhañ dilezel kostezenn Georg Strasser evit harpañ Hitler penn-da-benn). Pedal, a-benn ar fin, ez eo emdroadet an holl emsavioù-se war-du an emglev hag ar c'henvevrezh gant ar strolladoù hengounel eus an tu dehou. Penaos diskleriañ an dra-se ?

Ar gomunourion o deus evel just ur respont d'ar goulenness. Ar gevallourion eo o deus implijet arm ar faskouriezh hag ar genelwerinelouriezh evit diskar ar sokialouriezh. Ar seurt diskleriadur avat ne zalc'h ket kont eus daou fed anat a-walc'h. Da gentañ, en eneb d'ar pezh a c'hoarvez gant ar gomunourion, ne c'heller ket ober eus ar "gevallourion" ur strollad emskiantek, dezhañ palioù hag ur politikerezh resis, padred ar c'houlz ha ma'z int da gentañ penn. N'eus bet biskoc'h a emsav kevallant, strolladoù-potezañ kevallant, ne lavaran ket, hag int renet mui pe vuñ gant tud diatebek o klask hepken diskoulmañ kudennoù pleustrek ar mare hag oc'h en em harpañ war venozidegoù liesseurt ha kenenebet a-wechoù. Ha d'an eil, nerzh ar stourm enep-komunour n'eo ket deuet eus galloud ar gevallourion e-unan, - eus kendrec'herezh ar re o deus enebet ouzh mennadoù ar gomunourion evit abegoù breidel ne lavaran ket. Rakvann ar gomunourion a-du gant un diskoulm o klotañ gant o frammoù danvezkar a c'helle hepken o dallañ war ar poent-se.

Ret eo degemer eta e chom an emsavioù kenelwerinat ha fasket emsavioù dishual ha gwriziennel o deus klenket ar gevallouriezh en o c'henurzh e-lec'h bezañ klenket e kenurzh ar gevallourion.

M'o deus miret ar genelwerinelourion ul lec'h d'ar c'hevala o deus graet evit abegoù splann a-walc'h. Re a bouez ha re a berzh o doa kemeret e buhez ar vroad alaman - evel er vroad c'hall - ar renkadoù bourc'hiz pe zavmoure'hiz, stag ouzh ar gevallouriezh, dreist-holl en hengoun spredel ar vro hag e diazeidigezh ar sevenadur alaman, evit m'o dije gallet ar genelwerinelourion o skarzhañ hep diouerif war un dro an hengoun hag ar sevenadur a oa end-eeun sicheñ o "c'henelouriezh". (Er c'hontrol e oa ar bobl rusian ur bobl isdiorret e pep keñver, danvezel koulz ha spredel, ha gallet o deus savourion ar gomunouriezh eno, aes a-walc'h, loc'hañ diwar vamm da sevel ur sevenadur nevez a-grenn.) Ankouaat a reer re vuan, a gav din, ne c'heller ket ober gant ar sevenadurioù ar pezh a garer. Lakaomp o defe ar genelwerinelourion skarzhet en un taol ar renkadoù-ren kozh, krouet o defe en o bro ur goulloer spredel ha sevenadurel, en defe tennet da vezañ karget gant ar sevenadur rusian nevez, e oa al lañs gentañ d'an ampoent. Anat eo e oa dic'hallus dezho, anez en em zislavarout o-unan(1).

Kement-se ne dalv ket ne oa ket enebiezh etre ar renkadoù e Bro-Alamagn. Sklaer eo er c'hontrol ez eo bet ar genelwerinelouriezh un emziskouezadenn eus ar stourm etre renkadoù ha na dizhent ket en em genframmani arvat. Adal an XIXvet kantved ez eus diwanet e Bro-Alamagn evel er peurrest eus Europa kendereoù-kreiz nevez etre ar werin hag ar vrientinon. Ar re-se a zo deuet a-benn da emskiantañ o nerzh dre ar gouarnerezhioù gwerinren e derou an XXvet kantved hag ar brezel bed kentañ en deus broudet enno an anien-degañ brezelgar a zo oc'h huniñ e pep den. Un dro

(1) War a seblant, ne c'hell ket ar gomunouriezh ober berzh da vat avel mennad etrevroadel; rst eo dezhi evit trec'hiñ bezañ unanet gant ar menoz broadel. Ar varksouriezh ne lam ket ar c'henstakou etre broioù komunour. Abaoz ar brezel-mañ ez eus savet bec'h etre Rusia ha Yougoslavia, etre Rusia hag Albania, - Roumania, Hungaria ha Polonia o deus klasket hejañ kuit ar yev. Hiziv an deiz eo troet an tabut etre Rusia ha Sina da zisrann klok tost da vat. Ar sokialouriezh vroadel a vo atav un tentadur evit sokialourion ha kement-se a zisklar penaos meur a ez-sokialour evel Déat e Bro-C'hall - pe Aboezen e Breizh (kv. e Zeizlevr) a zo aet a-du gant ar genelwerinelouriezh d'ur mare.

ez eo bet ar genelwerinelouriezh evit ar renkadoù-se da zis-
teurel beli ar renkadoù a-us, o mac'homerezh speredel ha
kefredele war un dro, e oant gwasket gantañ hag o dismegañse
a-viskoazh.

Unded kevredigezhel an Trede Reich, a-hend-all, a oa diwar-
c'horre a-grenn. Ar wirionez e oa divrammet ar gevredigezh
alaman d'an ampoent hag e kaved enni urzhazoù kenskor : hini
ar stad hag ar strollad, hini lu ar stad (Wehrmacht) hag hini
ar strollad (S.S.), hini an ilizoù hag ar strollad, h.a.
Emsaverezh renkadoù a-is a-enep d'ar renkadoù a-us, dial ar
sklaved kozh a-enep d'o mistri kent, setu, en e zonañ, dalc'h
ar genelwerinelouriezh, nemet ez eo bet an emsaverezh-se mezhek
a-walc'h, un emsaverezh ha na grede ket anzav e anv, hini ar
bugel a gasa beli an tad hogen n'en em gav ket kreñv a-walc'h
da nac'hañ ar veli-se a-grenn(1). Ha gwir eo e wiskas an emsav-
erezh-se un neuz vil a-walc'h meur a wech; treiñ a rae da
nac'hañ holl dalvoudoù an dud a zoare - bourc'hizion, kristen
pe yuzev, pilpouz avat - ha disoc'hañ a-benn ar fin e-touez
an heulierion, da zial ar vihanempenneion hag an dreistmarmouz-
ion kigennet mat a-enep d'an otroc'hañ gosh a ziazeze mestroni
end-eeun war galloud o bred ha dreistelezh o deskadurezh.

Kement-se dres a ziskler krizded ha gouezoni ar genel-
werinelourion a-enep da rummoù tud 'zo, ar yuzevion pergen.
Moaer vat n'eo ket an euzhusterioù arbennik d'ar genelwerinel-
ourion; kavout a reer diouto, siwazh, e pep bro hag e pep amzer,
n'eus nemet kounañ lazhadegoù an dispac'herion c'hall, er bro-
ioù krec'h da skouer, pe re ar gomunourion rusian en amzer
Stalin pe vombezadegoù a seurt gant re Dresden, Hamburg pe
Hiroshima, hep kontañ ar re a zo bet sevenet a bep tu e-kerzh
ar brezelioù didrevadennañ. Koulskoude ne gav ket din ez eo
kennatur a-grenn krizded ar genelwerinelourion e-pad ar brezel
diwezhañ gant ar re emañ o paouez menegiñ. D'ar re-mañ e
c'helled reiñ da ziskleriadur - ne lavaran ket da zigarez -
ar gounnar, pe ur pal brezel bennak. Euzhusterioù ar genel-
werinelourion avat a zo diforc'h war daou boent. Gant reizh,

(1) Ar c'hevredigezhel ne c'hell bezañ nemet trauzlakeerezh ar bredel-hiniennel.

kenurzh ha war ur skeul divent ez int bet kaset da benn : me'
soñj e lazhadeg ar Yuzevion. A-hend-all e kaver en arlouperezh
an heskierion un elfenn a ziboellded, a "evitnetraerezh" hag a
zimegañs hiniennel discurt a-hend-all. Ar pezh a sko spered an
arvester eo e hañval an euzhusterioù-se, e-giz ma verken diouzhtu,
bezañ sevenet evit netra, hep pal brezel na politikerezh gwirion.
Amañ e vefe ret ensellout degouezh ar stad genelwerinat diazezet
war ur mac'homerezh aniel ha trivliadel, deveret diouzhtu ur
c'hoant dianzavet a veñjañs, ha diskouez n'eus anezhañ nemet ar
skeudenn-lu eus ar stad kreñv. Hogen ar gudenn-se, hini natur
ar stad hag an disstummadurioù anezhañ, a ranko bezañ studiet a-
ratozh e lec'h all.

Poent eo dastum ha klozañ ar studiadenn-mañ. Me 'gred e
ve da d'ar re a zo pe a chom douget mui pe vui da venozioù ar
genelwerinelourion en em zizober diouzhtu ar gimplezh o stag ouzh
o zremened pe o lak da glask er-maez eus o bro ar "veurded" a
ra diouer dezho. Ar pezh a glask hini pe hini er Ouenn, er C'hornog,
en Europa a-wechoù eo ar framm meur na gaver ket e Breizh hag a
zo bet kollet gant Bro-C'hall. Hogen a-raok bannañ Kornog d'el
laezvoù e vefe dav termeniñ e natur ha resizañ peseurt sevenadur
a zo dezhañ e gwirionez. Ar re avat a azeul ar sevenadur kornogat
ne azeulont 'm eus aon, nemet ar stumm danvezkar anezhañ. Kornog
a zo c'hoazh da sevel.

Pezh a c'heller lavarout avat diwar vremañ eo n'eus diazez
skiantel ebet d'ar ouennelouriezh. Ned eo ar ouenn - ar stumm-
korf sellet evel merk-orin a bobl un hinienn - nemet un devoud
bred-kevredigezhel e-touez re all a c'hell digemmañ tud pe rumm-
où-tud an eil diouzhtu egile. Ma vije bet Norzafrikiz gallegerion
gatolik pe lik ne vije bet biskoazh a vrezel Aljeria. Ha lakaomp
e vije bet, Europiz a orin a vije chomet du-se.

Moaer vat eo lieskementet ar marzad a estrenelezh hag a zi-
forc'helezh gant stumm-diaevaz an hinienn. Rak-se eo fur d'ur
gouarnamant chom hep digeriñ an nor d'un envroerezh a c'hellfe
degnas un elfenn a zigempouez e kevredigezh hag e sevenadur ar

vro. An Amerikaned ne notreont ket da Afrikiz na da Japaniz enbroañ er Stadoù Unanet, da skouer.

Ur vroad he deus ar gwir da genderc'hel e-giz ma oa ha da emdreiñ hervez hec'h istor; ur sevenadur a rank padout hervez e hengoun evit teurel frouezh talvoudus. Evel-se e c'hell ur bobl divizout chom europat. E gwirionez ne sav diaester ebet keit ha ma chom digemmesk ar poblañsoù.

Diskoulm kudenn an diforc'helezh hag estrenelezh a ranno bepred an dud - ezhomm o deus an dud d'en em hiniennekaat en ur framm a jaoz oute - ne c'helllo bezañ kavet moarvat nemet er genurzh a ziazezo underioù politikel enk a-walc'h evit gellout mirout didenn o c'hempouez hag o unvanded, hag a assay war un dro loc'herezh an hinienn war glask d'ur framm nevez a zerefe outi gwelloc'h, da lavarout er gevreadelezh. Seurt kenurzh a c'houlennfe ivez e ve savet ur stad liesvroadel a c'hellfe bezañ barner ha tredeog etre ar broadoù hag an hiniemoù diouzh ret. Mar sav bac'h ha diaesterioù etre broadoù hag hiniemoù hervez al lezenn ha n'eo ket dre an nerzh e tle-int bezañ lamet. Hogen ar gudenn-se a ranko ivez bezañ studiet a ziforc'h.

N'eus forzh penaos, hag an dra-se a ranker diogeliñ gant nerzh, ur pal reizh ne c'hell ket bezañ tizhet gant doareoù vil, kriz hag heugus.

o o o

Notenn I - Daoust ha deuet e vije ar genelwerinelourion a-benn da grouiñ ur "sevenadur" nevez unvan en diwezh ? Marteze a-walc'h, mar bijent bet trec'h. Hogen n'eus mar ebet ivez, a gredan, e vije bet enep-kristen ar sevenadur-se hag o dije arveret ar genelwerinelourion evit e ziazezañ ar memes doareoù-ober dizenel ha dizamant, sadek en ur ger, o doa implijet a-ziagent. Pep tra a vije bet diouzh froudenn ha stultenn un nebeut tud o defe divizet o-unan tonkadur milionoù a re all.

Notenn II - E-keñver Prosez Nuremberg e-unan, em eus displeget va ali a-dal 1946. N'em eus ket kemmet anezhañ abaoe. Ur prosez a oa da vezañ graet. Hogen ne c'helle bezañ graet nemet en anv ur c'henwir hag un urzhiadur etrevroadel, ha gant barnerion dibabet e broioù a oa chomet er-maez eus ar c'henstok. Ne

c'heller ket bezañ barner, klemmer ha torfedour war un dro; stadoù modern Europa a-hend-all dileuriet barnerion ganto d'al lez-varn-se o doa sevenet euzhusterioù a-walc'h a seurt gant ar re a damallent d'ar genelwerinelourion e-kerz o istor. Ha gouarnerezh Stalin e-unan, d'ar c'houlz-se end-eeun, a oa ken direizh hag hini Hitler. E-giz ma voe graet e hañval ar prosez-se bezañ da gentañ dial an drec'hourion a-enep d'ar re drec'het.

)) o ((

Y O U E N N O L I E R

R E N K A D H A P O B L

R A K L A V A R

Ne vo kavet nemet ur vras-studi en displegadenn-mañ a zo bet savet prim a-walc'h. Moarvat ez eo pouezus kudenn ar renkad hogen arabat e vefe reiñ dezhi ur pouez re vras evelato. Ne gredan ket tamm ebet e vez divizet buhez ha tonkadur ur bobl gant darempredoù diabarzh ar renkadoù anezhi hepken.

Degemeret eo bet ar sklavelezh gant ar sklaved o-unan en henamzer. Hag e Breizh da vare an dispac'h gall eus 1789 o deus kenstourmet noblañsoù ha kouerion, daoust ma cant enebet war an dachenn gevredigezhel rik, dre m'o doa a-hend-all an hevelep kredenn hag ereoù kevredigezhel darnel dre hanterouriezh an iliz.

Pezh a glaskin ober hepken eo da gentañ burutellañ damkaniezhoù ha mennadoù ar varksouriezh; d'an eil, diskouez al liamm a zo e Breizh etre ar o'healioù a renkad hag a vroad goude m'eo en em ledet e pep lec'h kelennadurezh Varks.

oooooooooooo Gwelomp bremañ dres un nebeut merkoù-diforc'h eus kelennadurezh Varks.

Ar c'heal a renkad, da skouer, a zo bet lakaet diouzh ar c'hiz gant Karl Marks hag e warlerc'hidi. Hogen a-viskoazh ez eus bet darempredoù a renkad e diabarzh ar gevredigezh, pezh na dalv ket ez eo bet an darempredoù-se bepred, evel ma verken diouzhtu, darempredoù a eneberezh oberiant. Karl Marks avat en deus roet d'ar renkad, da gentañ ha dreist-holl da hini an dud didra, emskiant anezhi hec'h-unan, diforc'het, didoueziet, diazezet ha kenurzhiet anezhi, roet dezhi un emzalc'h a eneberezh hag a stourm ouzh "renkad" ar vourc'hizion", e-lec'h an hini a isurzhiezh a oa strezo a-raok.

Un nevezder all eus kelennadurezh Varks e oa ober eus an arc'hant hag an armerzh dre vras kenere ar renkadoù. Pep galloud ha pep urzhaz, pep beli, pep darempred kevredigezhel a oa armerzhel o natur, war e veno. Merk-anaout ar genurzh kevalaour, da skouer, e oa korvoadur an den didra evel ur benveg a-benn kreskiñ peadra ar vistri-arc'hant.

Dont a ra al labourer da vezañ tra e berc'henn; hag eñ e-unan a zo diberc'hennet dioutañ e-unan : arallekast ez eo. Evel-se e teu keal an arallekadur da vezañ pennañ diazez ar vuhezouriezh varksiat. An droug nemetañ er gevredigezh ez eo an arallekadur a varn an denelezh d'an emrannadur. Ha mat eo kement a sikour Mab-den d'en em zieubiñ diouzh ar walenn-se.

Ar pezh a ranker pouezañ warnañ adal bremañ ez eo penaos e loc'h Marks diouzh ur menoz buhezal ha n'eo ket unan skiantel rik : hini dellid Mab-den. Ur sturarmzhouriezh en deus empennet ha n'eo ket un armerzhouriezh rik evel an ekonomourion saoz hag amerikan : Smith, Ricardo, Galbraith, Keynes hiziv an deiz. Moarvat en deus studiet armerzh e amzer hervez hentenoù skiantel e-barzh "Das Kapital" da skouer. Hogen ar varmadenn en deus douget diwar he fenn e oa awenet gant ur preder buhezal. An arboellerezh kevalaour a oa reizhekaet en ur stumm dioutañ e-unan, gant uhelwaskoù hag izelwaskoù o tont an eil war-lerc'h eben ez reoliek a-walc'h. Ur genurzh dezhañ e-unan en doa an arboellerezh kevalaour. Kendaonet eo bet gant Marks dre ma tis-megañse ha dre ma vac'home an darn-vuiañ eus an dud a gemere perzh ennañ hag a oa aberzhet d'ar C'horvo a droe d'ur gwir Zoue a c'houlenne azeulerezh pep hini.

Ar C'horvo, an talvoud-ouzhpennet, mab ar c'hevala, a zeu da vezañ e-barzh menoziadeg Varks, ur marzhvoud, enboudeladur an Droug, an Droukspered pe an diaoul kristen a-ziagent peogwir ez eo arcezenn an den korvoet gant an den. Evel an diaoul kristen

avat ez eo tonket dezhañ bezañ trec'het pe, zoken, en em zistr-ujañ e-unan. Dre ar c'henderc'hiñ diraktres ha dirakwel, sturiet gant ar gonid dall hepmuiken, e tisoc'h ar c'hevala d'ar re-varc'hadourezh, d'an ol-werzh, d'ar freuzadegoù-stal a stlap al labourerion paouroc'h-paoureañ e-keñver pinvidigezh o mistri er reuzeudigezh vrasañ. C'hoarvezout a ra ar brezel pe enkadennoù a seurt gant hini 1929. D'ar c'houlz-se eo en em sav an dud didra chomet glan diouzh breinadurezh ar vistri arc'hant, broudet gant an dienez; kemer a reont ar galloud, diazezañ unrenerezh an di-draeion, da lavarout eo hini ar strollad komunour, an estaoladur anezhañ. Loc'het diouzh ur vro en em led an dispac'h d'an hollved a-bezh. Goude ur marevezh a sokialouriezh e ren ar gomunouriezh en diwezh pa vez kresket a-walc'h glad ha pinvidigezh ar gevredigezh evit gellout gwalc'hañ holl ezhommoù Mab-den, hep rankout dasparzhañ madoù dibaot.

Setu, da vihanañ, pezh a oa empennet ha diouganet gant Marks en XIXvet kantved. Meur a vumud eus an imbroudadur-mañ n'eo ket bet kaset da wir a-c'houdevezh : kempennet eo bet ar gevalouriezh abaoe. Da skouer, en doa kredet Marks e tarzhe an dispac'h da gentañ en ur vro diorroet he greanterezh, e-giz Alamagn pe Vro-Saoz. Ar broioù-se avat a zo chomet stabiloc'h eget ar re all. Er c'hontrol o deus graet berzh ar gomunourion en ur vroad kourion isdiorroet, Rusia (kemend-all a zo c'hoarvezet ivez er broadoù isdispaleget en Azia : Sina, Vietnam, h.a.). Ouzhpenn-se n'eo ket deuet ar reveulzi da heul un enkadenn armerzhel, diwar-lerc'h brezelioù hengounel ne lavaran ket; n'eo ket en abeg d'an dilezioù-labour h.a. o deus graet berzh, a drugarez da bengadourion ha da gadoniourion ampant, gant sikour hag harp soudarded goudonet ha kenderc'het ne lavaran ket. Dre heg, a-vras, ez eo bet diazezet ar gomunouriezh, gant un niver bihan a dud, evel ma voe diwezhatoc'h e kenelioù slavek reter Europa, gant sikour ar stad rusiat komunour. Rentadur ar c'hemer-galloud er stadoù komunour a hiziv a zo bet eta disheñvel krenn diouzh an hini a oa bet empennet gant Marks er penn-kentañ da vihanañ. Hemañ e gwirionez en doa klasket raktresañ an istor evel un emdroadur pe un dibunadur rediel ha tonket, a c'helled termeniñ al lezennoù anezho, dizaonus ha kalonekaus eta. Hogen war a seblant e chom an istor e dalc'h an degouezh hag an darvoud, diouzh youl hag intrudu an dud, da lavarout eo, en arbenn da se, bepred ken di-asuru.

Pezh a glaske Marks e gwirionez e oa reiñ ur poell d'an istor. Hogen penaos en defe gallet da ne oa ket poelleun a-grem e kelennadurezh-eñ ? Meur a zislavar a zo e fed e damkaniezhoù

Marks. Bez ez eus da skouer keal an hollzarvezzelouriezh skiant. el a c'houlaka darempredoù rediel hepmaiken etre elfennoù an hollved maz eo Mab-den darn anezhañ - ha war un dro ez engalver dellid Mab-den evel diazez an istor ha gortoz a reer d'e rezid seveniñ an istor-se hag a zlefe bezañ tonket evel kement a zo er bed. D'an istor adarre e roer un uhelbal tidel ha buhezel war un dro, a zo e gwirionez ouzhpennet d'an natur : hini Mestroni an Den nevez kenurzhiet war ar bed ha da gentañ warnañ e unan evel darn eus ar bed. A-benn ar fin ne dizher ket enframmañ. Mab-den en un natur ha n'he deus dioutañ e-unan ster na finvezh ebet.

A-hend-all ne ra ket diouer ar menozioù buhezel rik er varksiadegzh. Lakaomp, hini ar Salver, an Den Didra, manet anterin ha dinamm, glan diouzh breinadurezh an arc'hant. War-c'hoazh e c'heder gamedigezh an den nevez dibec'h pa vo bet parc'et ha glanaet ar gevredigezh. Adal bremañ e c'houlenn digant ar stourmer komunour un emzalc'h kravezal rik, diazezet war an emberzh klok ha na gav e ster nemet e framm ur venoz-iadeg relijiel o termeniñ an darempred a zle bezañ etre Peurvoud ha rannvoud.

Kement-se a c'holler diskleriañ dre m'eo ar varksiadegzh merc'h vastardez an hollzarvezzelouriezh klasel eus an 18^{vet} kantved ha war un dro hini an hollgealadegzh hegelat en 19^{vet} kantved. N'en deus graet Marks nemet reiñ un anv resis d'ar C'heal hegelat a chome en neñvod. Graet en deus anezhañ ar gevredigezh komunour a vo war un dro dibenn an istor hag enkorfidur klok ar C'heal. Ar vesiazelezh aroueziet gant keal dizeriadur ar stad ha diwezh an istor a zo merk-anaout ar varksiadegzh ha sin e gerentiezh-treuz gant ar gristeniezh.

..... Eno emañ, a gav din, gwander anatañ ar varksiadegzh. Moarvat en deus gallet ar menoz-se ober berzh e-touez ar Varksourion dre ma kav e wrizienn en ur c'hengoun a zo sanket don e spered an dud : hini ar Bazadoz kollet da adkavout. A-hend-all, meizad ar fonnusted diheskus, hini ar gevredigezh fonnus, an "affluent society" a zo bet brudet ha kanneulet kouls ha mui marteze gant soñjourion hag arnodskrivourion c'hall pe amerikan dishual, e-giz Fourastié pe Galbraith. Erruout a ray ur c'houlz, emezo holl, ma vo ken stank peadra an denelezh ma c'helle pep hini tennañ diouzh an teñzor boutin ouzhpenn a-walc'h da gentañ gant e ezhommoù. Echu e vo an dasparzherezh hag an urzhazerezh, redierezh ha renerezh an amzer-

vezh sokialour. Dre ma vo gwalc'het ezhommoù an holl e vo lamet an enebiezh etre izili ar gevredigezh ha bleuniañ a raio ar frankiz hag an eurvad, ar garantez hag ar vertuz en diwezh.

An dra-se, dres, eo a seblant faos a-grenn, dre ma ne zalc'h ket kont eus Natur Mab-den hag e vreskadurezh. Diwalc'hus ha diemacous eo Mab-den e gwirionez, ha moarvat emañ eno andon e veurded. Un elfenn gravezel ha dreistpoell a zo en e natur hag ar gevredigezh empennet gant komunourion pe nevez-kavalaourion ne c'halle biken klotañ gant e wirvoud. Ur fazi eo eta kredif e vleunio an eurvad en ur gevredigezh fonnus war zigarez en devezo pep hini ouzhpenn e walc'h da guzumiñ. Skouer Lec'hleñn a zo talvoudus er c'hefver-se. War ar marc'had, a zo gwashoc'h, n'eo ket sur tamm ebet e tizho an hinienn e rezid zoken en ur gevredigezh fonnus. Ar gevredigezh fonnus-se a c'houlenn un urzhiadur strizh-tre, sturiekaet; ar sturiegezh-se avat a c'houlenn d'he zro arbennigourion stank diziouerus. Ar re-mañ, kaer a vo ober, a vo mistri ar gevredigezh. Rak int hepken a c'halle he lakaat da vale.

En ur seurt kevredigezh sturiekaet e vo lamet pep kiriegezh digant an hinienn kouls ha digant an engroez. Ne c'hallint bezañ nemet jedelfennoù e kontoù an arbennigourion.

Diboell ha disevenadus eo eta pal ar gomunouriezh. Hogen an hentadur anezhi a zo ken diboeall all. E-giz m'em eus lavaret e derou an displegadenn-mañ, diazezet eo ar gomunouriezh war ar c'heal a renkad ha war hini ar brezel etre renkadoù. Hogen diwirion, evit darn, eo meizadur marksiat ar renkadoù.

Ar re-mañ n'int ket termenet gant perc'hennañ an arc'hant hag ar galloud armerzhel nemetken. Ar galloud politikel rik hag ar sevenadurezh a c'hall ivez o diforc'hañ. Anat e oa kement se da skouer, er gevredigezh c'hall a-raok 1789. Noblañsoù 'zo a oa paouroc'h eget bourc'hizion 'zo. Fadal n'en em gemmeskent tamm ebet etrezo ha ne santent tamm ebet e oant kenlodek an eil re d'ar all. Kemeromp ar gevredigezh amerikan a hiziv. Daoust ma wash an diforc'h leve ha rez-bevañ ar rannadur a zisparti ar gumuniezh vorian diouzh an hini wenn ez eo sklaer ivez n'eo ket an diforc'h leve-se andon pennañ an enebiezh a zo etre an div renkad - hag an dispac'hadennoù a zo nevez c'hoarvezet e Los Angeles henn diskouez anat. Emzalc'h ar re wenn paour en Algeria e-kerz ar bloavezhioù tremenet a ya ivez a-enep da dezenn Varks. Sevenadurioù distag, hengounioù distag, doareoù-bevañ distag - degaset gant un endro arboellerezhel en derou a-wechoù - a c'hall kerkouls all ha mui eget ar galloud armerzhel o didoueziañ hag o diveskañ. Ur morian pinvidik n'en em santo

ket kenlodek d'an den gwenn a vo par d'e hini e c'halloud armerzhel, d'ar gumuniezh vorian dre vras ne lavaran ket.

Kemeromp adarre degouezh ar gevredigezh c'hall. War-lerc'h dispac'h 1789 en em gavas unanet moarvat kendere ar vourc'hizion gant hini an noblañsoù, dreist-holl dirak emsav an didraeion. Sur mat o doa kollet neuze an noblañsoù ar pep brasañ eus o brientoù politikel. Hogen seurt emglev ne c'hallas c'hoarvezout nemet dre ma oa bet unvanet mui pe vui en a-raok doareoù sevenadurel an daou gendere. Ha ment-se a oa degouezhet dre m'en doa gallet ar renkad a-is bezañ lodek e brientoù hag e doare-bevañ ar renkad a-us, a hiniemoù da vihanañ. Neuze e c'halle ar renkad a-us hevelebeakaat ar renkad a-is hep distrujañ anezhi. Dre al lodegezh c'hallus-se e c'hell ur renkad trec'h ren ar gevredigezh-se, evel ma c'hall ur bobl drec'h sunañ danvez an hini drec'het dre ginnig kenwir hag ingalded da izili 'zo anezhi.

Rak, kaset d'ar penn pellañ e c'hall an diforc'h etre renkadoù ober anezho pobloù disheñvel o vevañ war an hevelep douar, a-wechoù o komz yezhoù disheñvel da vareoù 'zo. An dra-se a zo c'hoarvezet e Bro-C'hall keit ha ma vras ar C'hermaned o yezh (pep a wirouriezh disheñvel o devoa neuze Germaned ha Gall-romaned). Kement-se zo c'hoarvezet e Breizh marteze e derou an divroadez pa oa un diforc'h yezh etre divroerion hag henvroiz, lakaet ne vije ket bet Breizh adal neuze un drevadenn boblañ kentoc'h eget un drevadenn aloubiñ, lakaet ivez e komze Arvorigiz latin holl gwitibunan ha na ouient tamm keltieg ebet e neb lec'h, pezh n'eo ket sur. An hevelep tra avat a c'hoarvezas ivez war an tu gin pa zegemeras noblañsoù hag uhelidi ar vro-mañ ar romaneg adal an XIvet kantved. Bez' e c'haller lavarout eta ne zeu ket an trokañ-yezh a bobl da bobl hogen a renkad da renkad e diabarzh ar vro, ar c'hendere uhelañ hag ar muiañ diorroet ha kenurzhiet o vont da batrom d'an hini izeloc'h evel ma'z eo kaer gortoz. Evel-se eta, diwar an XIvet kantved, ned eo mui ar brezhoneg yezh ur bobl, yezh ur vroad klok, yezh ur genel, met muioù-h-mui yezh ur renkad ha n'he deus perzh a bouez ebet e mererezh hag e sevenadur ar vro. Deuet eo ar brezhoneg da vezañ yezh ar Geizh e gwirionez, yezh ar Geizh dic'halloud dre ma n'o doa dres na deskadurezh, na gwir sevenadurezh en c'herz. Rak, daoust da gement a gontel - ret eo distrujañ ar sorc'henn - n'eus ket a sevenadur gwerinel. Hemañ ned eo nemet ezh isdiorroet ha diglok a zo tonket da vont da get dre en em stagañ ouzh ar sevenadur klok a zo ouzh e c'hronnañ a bep tu hag a lonko anezhañ en diwezh.

Amañ, dres, e c'hallomp en em c'houleñn petra a stag ar c'hendereoù kenetrezo d'ober anezho ur bobl. Me ' gred e c'haller respont ez eo ar c'henezhomm o deus ar renkadoù an eil eus eben o feg etrezo hag a ra ur vroad anezho. Emskiantadur ar c'henezhomm-se a denn eveljust da gadarnaat beli ar renkad ar muiañ displeget hag emdroet, a zalc'h ar c'halvioù retañ - gwechall, da skouer, hini ar brezel, - pe donoc'h en henamzer micher an hini a lak e darempred gant galloudoù an tu-hont, ar veleion - pezh a dalvez ez eo stag ur gevredigezh ouzh ur gemurzhiaid talvoudoù bennak, da lavarout eo ouzh an degemeradur gant an holl izili anezhi eus ur bedveizadur bennak. Diouzh ma'z eo miret gant an holl ar bedveizadur-se e chom stabil ar gevredigezh. Degemeret eo urzhaz hag aotrouniezh, beli ha renadurezh, hag asantet ar sentidigezh. Neuze e vez ar renkadoù ez eus anezho ur bloc'h dizisrannus ha klok.

Ampartiz Karl Marks ez eo bet terriñ emskiantadur ar c'henezhomm-se dre en em harpañ war ziskar ar gredenn voutin a stage ar renkadoù kenetrezo hag emdroadur ar gevredigezh hec'h-unan a eilpennas kempuez ar c'halvioù hag ar galvedigezhioù. Kement-se a c'hoarvezas en XVIII-XIXvet kantved. Marks en deus klasket ober neuze eus ur renkad a ziforc'h ur bobl distag a zistaele kuit beli ar renkad a-us, ur bobl dileñnet a zlee kas an istor d'e zibenn. Eleze en deus enaouet un emskiant kumuniezh, gwell, un emskiant bobl e kendere an didraeion (pe ar re a felle dezho sellout outo evel didraeion). Dav eo lavarout avat n'eo ket bet an emskiantadur-se un dra natur. Rak n'eo ket ar renkad he deus ganet ar varksouriezh hogen ar c'hontrol eo a zo gwir : ar varksouriezh an hini eo he deus krouet ar renkad evel kevredigezh klok hag a ziforc'h. Moarvat ne c'hallas arnod Marks ober berzh nemet peogwir e oa gwall horjellec' endev diazezoù ar sevenadur kornogad : kendibennerezhioù 'zo ne oant ket mui santet; deuet e oa kemm ivez e pouezioù kenenebel ar c'halvioù hag ar c'hargoù er gevredigezh; ar renkadoù a-us e oa bet douget o unan da sevel pobloù a-ziforc'h, gant ur bedveizadur, ur gravez hag ur sevenadur dezho o-unan ha n'o doa ar renkadoù a-is perzh ebet enno. Hogen Marks en deus gouezet tennañ implij eus an emgav-se evit lakaat renkad ar dud didra da gompren e oa anezhañ ur gumuniezh klok a oa awalc'h dezhi hec'h-unan, e c'helle enebañ ouzh ar c'hendereoù all hag o zrec'hiñ diouzh ret. Kement-se ne rae tamm ebet dre vrizh-trivrierezh, dre ma trueze ouzh stad ar vicherourion (hag eñ bourc'hiz ne c'helle ket kensantout nemeur gant tud ar werin); hogen dre ma soñje e oa ar gounnar hag ar gasoni ar gwellañ broud d'an emgav; hag an dud didra en e amzer o doa ouzhpenn

abeg d'o magañ leizh o c'halon, rak gwasket, mac'homet, dis-
prizet, dismegañset e oant; hag an emsevel a oa evito e gwir-
ionez an tu nemetañ da saveteiñ o dellid den.

Hogen pal Marks ne oa ket hepken daskorifi dezho o dellid
den - pezh en deus graet e gwirionez - hogen kinnig dezho ur
sevenadur hag ur vuhezouriezh nevez da sevel. Da lavarout eo,
kinniget en deus dezho bezañ ur bobl.

Hogen ar bobl nevez-se a zlee krouiñ ur sevenadur nevez
ne oa ket diurzhas. Marks en deus lakaet hepken an dud didra
da zegemer un urzhaz nevez a gave he sichenn en emskiantadur
kendibennerezhioù nevez stag ouzh savidigezh ur strollad aozet
evel ur stad; roll ar stad-se e oa krouiñ ur sevenadur nevez.
En e ziabarzh ne c'helle ket bezañ a arallekadur.

oooooooooooo

Poent eo dres ensellout meizad an arallekaat
e kelennadurezh Varks ha gwelout pegen amsteriek ez eo. Notomp
da gentañ ez eo ar meizad-se ur meizad buhezel diouzh ma'z eo
diazezet war dellid Mab-den. An tamall gwashañ a ra Marks d'ar
genurzh kevalour eo dismegañsiñ Mab-den dre ober anezhañ tra
unan arall, da lavarout eo dibere'hennañ an den didra dioutañ
e-unan. Dont a ra an den da vezañ ur benveg hag un tu nemeken
e-lec'h bezañ ur finvezh.

D'ar c'houz-se ez eo ret anzav ez eo an arallekaat ur
fed kalz ledanoc'h ha kalz hollekoc'h er gevredigezh eget pezh
a rofe Marks da grediñ. Moarvat ez eo "implijet" ar micherour
er genurzh kevalour a-benn kreskiñ kevala e vestr. Hogen er
stad sokialour e c'hall ivez ar micherour bezañ implijet gant
ar stad da seveniñ ar raktres ha gant mestr ar gresanti stadel-
aet a-benn bezañ deuet mat gant e usderezidi hag ar velestrour-
ion dre vras. Er mererezh, e c'hoarvez kemend-all, e kement lec'h
ma vez beli, hag alies e vez "korvoet" an isurzhidi gant an us-
urzhidi. Deomp pelloc'h, e diabarzh an tiegezh zoken e c'hall
patañ an arallekaat diouzh ma implij ar gerent o bugale e sell
d'o mennadoù-int o-unan.

Ar skouerioù-mañ a ro tu da vevennañ resis tachenn an arall-
ekaat. N'eus a arallekadur nemet pa n'en em adkav ket an hinienn
er framm m'eo klenket ennañ, da lavarout eo pa ne denn mad ebet
dioutañ evitañ e-unan ha pa zistaol anezhañ. Hogen bez' e c'hall
ar bugel en em adkavout en tiegezh - hag an darempredoù natur
etre izili an tiegezh a zo diazezet neuze war ar garantez hag
ar fiziañs diouzh ma ensamm an izili anezhañ mennad an tiegezh
dre vras, ha kement-se daoust pegen direizh ha mac'hom bennak
e vo ar belizalc'her. Heñvel, bez' e c'hall ar micherour en em

adkavout er genurzh sokialour, hag ar c'hargiad er stad, diouzh
ma kredont en talvoudoù difennet gant ar gevredigezh sokialour
pe ar stad end-eeun. N'eus ket a arallekaat eta pa asant an
hinienn d'en em aberzhiñ d'an talvoudoù difennet gant ar gomun-
iezh ez eo ezal anezhi, dre gaer pe dre heg. Arallekaat eo ar
micherour diouzh ma nac'h talvoudoù ar gevredigezh kevalour.
Kement-se a ziskouez ez eo an arallekaat ur meizad dangorek rik.

oooooooooooo

Kemeromp bremañ degouezh Breizh. En ur stumm
ez eo damheñvel emgav pobl Vreizh ouzh hini renkad an didraeion
er broioù kevalour e-keñver kendere ar vourc'hizion. Da lavar-
out eo ez eo gonezet ar Vretoned e sell da dalvoudoù a zo estren
ouzh o gwirvoud, da lavarout eo ez int arallekaat. Hogen evel an
didraeion a-raok amzer Varks n'o deus ket meizet o estreñlezh
ouzh an talvoudoù-se ha kendere'hel a reont da zegemer ur vali
ha na zalc'h kont ebet anezho. Amañ e ranker resisaat. Anat eo
ne c'hall bezañ darsantet an arallekadur nemet gant kendereoù
ar werin pe ar re a zo chomet stag a dost a-walc'h ouzh ar c'henn-
dereoù-se, dreist-holl avat gant ar re a gomz ar yezh, muioc'h
c'hoazh gant ar re he c'homz a-youl daoust pegen dister bennak
eo o niver, dre vras avat gant ar re a zo chomet estren ouzh
hengoun ar vourc'hizion c'hall a zo e diazez ar vroadelezh hag
ar stad gall. Me ' fell din lavarout amañ ne c'hall ket ur
bourc'hiz galleg er em santout arallekaat e-keñver ar c'hall-
aoud peogwir en em gemmesk penn-da-benn gant ar c'hendere a zo
e penn ar stad c'hall. Pe ne c'hell kenn ober nemet dre en em
ensammañ er werin ha dilc'zel e renkad. Ezhomm en deus eta eus
un droidigezh da zont da vezañ Breizhad. Bez e c'hall kenn ober
evelato dre m'en em sant kenstag ouzh renkadoù gwerinel ar vro
hogen ned eo ket an dra-se natur dezhañ. Dre vras eta e tle hor
bruderezh plediñ da gentañ penn gant ar werin ha n'eo ket lodok
da vat en hengoun ar stad c'hall, kinnig dezhi ar raktres a roy
dezhi ar muiañ a bouez e buhez politikel ar vro, goude m'he devo
meizet hec'h arallekadur, tennañ diouti ar frammataerion hag ar
sternioù hor bo ezhomm anezho evit hor riez da zont.

oooooooooooo

Luziet a-walc'h eo ar gudenn avat. Gwellet hon
eus dija penaos ez eo aet Breizh da get dre m'eo bet ensammet
ar c'hendere-ren en hor bro a-gent - hini an Iliz, noblañsoù,
bourc'hizion, - e kendere-ren Bro-C'hall (merk anatañ an ensamm-
adur-se ez eo bet an trokadur-yezh). Hogen kemend-all a zo war
var da c'hoarvezout er c'hendereoù gwerinel hiziv e Breizh.

Dre ar sindikadoù gall, dre ar strolladoù politikel gall, ez eo enframmet muioc'h-mui er sternioù gall izili oberiantañ renkadoù a-is hor bro. Arabat bezañ souezhet ma tro Breizhiz war an tu kleiz gall abaoe ar brezel diwezhañ dreist-holl. Ar re-mañ a ra berzh dre ma tamveiz ar Vretoned muioc'h-mui o arallekadur. Hogen dres e kinnig ar gomunourion c'hall, da skouer un diskoulm d'ar gudenn anezhañ, diskoulm faoz moarvat rak ne c'halle biken ar c'homunour en ur vro a hir hengoun bourc'hiz chom hep bezañ lodek en hengoun-se dres, diskoulm touellus e Breizh eta, rak ar vourc'hizion n'o deus mui perzh ebet abaoe kantvedoù e buhez wirion ar vro, hogen diskoulm a c'hall hañv-alout degemeradus d'ar c'hentañ sell.

Rak setu an dalc'h d'am soñj. Bez e c'hallomp kinnig da bobl Vreizh un diskoulm klokoc'h eget hini ar varksourion hag ar gomunourion. Fazi ar re-mañ ez eo kredif ez eo ar renkad diazez ar gevredigezh. Ar bobl an hini eo a zo an diazez-se. Rak ned eo an emskiant-renkad, e-giz m'hon eus gwelet, nemet ur bazenn vermbad war-du un emskiant-bobl nevez gant ur spered-egezh nevez, ur bedveizadur hag ur sevenadur nevez. Betek-henn e c'haller lavarout zoken n'en deus graet berzh mennad Marks nemet e-lec'h eo bet kevredet ar vroadelouriezh gant ar gomunouriezh. Chomet eo Rusia ar vro impalaergar e oa a-raok an dispac'h; kemend-all zo gwir evit Sina a zo renet gant ar vro-adelezh Han hepmuiken. E-lec'h all ez eo bet ar gomunourion e penn an emsavioù-dieubiñ, h.e.

Er C'hornog avat o deus c'hwiteñ ar gomunourion dre ma n'o deus ket gouezet kevredif mat marksouriezh ha broadelouriezh. Iekaomp Bro-C'hall ha Bro-Alamagn : kaer zo ober ez eo lodek an holl renkadoù e Bro-C'hall e sevenadur hengounel bourc'hiz ar vro, war-bouez ar yezh hag al lennegezh c'hallek a zo bet savet gant bourc'hizion hepmuiken. Ne c'hell ket ur gall, goude ma ve komunour, ober fac war ar yezh, al lennegezh, an arz, ar sevenadur en ur ger, a zo bet savet gant ar renkad a zo bet atebek evit ar bobl a-bezh e-pad kantvedoù. Hiziv a-hend-all ez a ar bobl c'hall war unvaniñ dre ma kresk ar rez-bevañ en holl gendereoù ar gevredigezh, ken e tistera an emskiant-diouerif er renkadoù a-is, dre m'en em led an deskadurezh en holl bazennoù ar gevredigezh (300.000 bachelour hevlene), dre m'en em liesrann ivez renkad an dud didra e meur a gendere-etre a vruzhone unded. En arbenn da gement-se holl n'o deus nac'het biskoazh izili ar renkadoù a-is ken e Bro-C'hall ken e Bro-Alamagn kemer perzh e brezelioù o stadoù, daoust ma oa renet ar stadoù-se gant bourc'hizion. Rak-se ivez - hep gouzout dezho ha daoust da gement a embannont - o deus tud ar bobl dilennet

D.G. e 1944 hag e 1958. A-benn ar fin ne c'hall mui an emsav marksiat en holl vroioù ar c'hornog nemet bezañ kempenner e-lec'h bezañ dispac'her, dioutañ e-unan, er-maez eus etredonadur ur vro all, ha kement-se, a adlavaran, en abeg d'an osmoz a zo en em ledet en holl gendereoù ar gevredigezh dre hanterouriezh ar yezh. Daoust da bep tra en em sant an den eus ar werin kendibenn gant ar bourc'hiz a zo e penn ar vro. Da lavarout eo ez eo deuet lugan ar "brezel-renkadoù" da vezañ ur ger goull hep ster ebet. Tonket eo eta emsav ar gostezenn gleiz da c'hwiteñ er-maez eus trec'h ar Rusianed en ur brezel atomel.

ooooooooooooo Ar Vretoned hepken, evel Bretoned, diouzh ma loc'hont diouzh mann, diouzh ma nac'hont a-grenn yezh ha sevenadur Bro-C'hall, a c'helle sevel ur bobl hag ur sevenadur nevez. Er c'heñver-se ez eo hor paourtezh hag hon dienez, hon diistor arnevez, ur c'hañs e meur a geñver dre ma kreskont hor frankiz ha ma aotreont deomp kas klokoc'h dispac'h da benn. Adal m'o devo degemeret ez int ur bobl - o broudañ a c'hallimp d'henn ober dre reif ur ster d'ar meizad a arallekaat a zo ouzh o strafuilhañ e rankint mont betek penn an hent nevez hor bo diskouezet dezho.

Ar vroadelourion hepken ivez, dre ma roont da Vreizh ur bezoud klok hag a-ziforc'h a-grenn, a c'hall reif ur ster'leun d'an arallekaat. Sotoni ar rannvroelourion eo degemer fed Breizh e framm Frañs rak steuziañ a ra an arallekadur d'ar c'houlz-se dre maz eo ar Vretoned lodek neuze er sevenadur hag er spered-egezh c'hall. Dav eo dezho d'ar mare-se degemer urzhiadur ar rumm renerion a zo kret evit melestradur ar stad c'hall dre vras. Ma nac'h ar re-se outo, evit kenvad ar bobl ez int darn anezhi, gouez dezho o-unan, kement goulenn a c'hallont ober, ne chom mui dezho hervez ar reizhpoull nemet tevel ha plegañ.

RESISADURIOU HA DASTUMENN

Arabat e vefe reif d'ar studiadenn-mañ ur ster ha n'he deus ket. N'em eus graet nemet displegañ ur savboont ma c'haller arvestiñ ouzh kudenn hon ober. Eveljust ne c'haller ket ijinañ n'eus forzh peseurt emsav ha ne vern peseurt kelennadurezh da respont da gudenn arallekadur ar Vretoned. Diazezoù ergorat a zo ivez da stourm ar vroadelourion, - liesseurt tre eo avat AL LUSKERIOU A ZEGAS AR STOURMERION D'AN EMGANN. Hag ar stourmerion,

na petra 'ta, eo a zo a-bouez en un emsav : int eo a-benn ar fin a grou an talvoudoù, ar sevenadur. An engroezioù ne zevoud-ont netra.

Daoust ma rank an emsav bezañ poellek, da lavarout eo tennañ da wellaat stad ar gevredigezh dre vras, ez eo arabat bezañ en gortoz e sentfe ur stourmer ouzh e c'halvedigezh evit abegoù a boell nemetken. Kant abeg a c'hell degas un den d'ar stourm. Lakaomp e ve zoken meizidigezh arallekadur e bobl : n'ankounac'haomp ket ez eo buhez an arallekadur en un endro personel rik. Ne vez ket ganet un emsav diouzh un engroez bennak e-unan a gemerfe skiant eus e arallekadur hogen diouzh prouiad ha preder un nebeut tud o deus ervevet en un doare krisoc'h ha lemmoc'h drama o fobl a chom dic'houzvez da houmañ a-wechoù. Graet eo an istor gant personiezhoù dieub ha n'eo ket gant un engroez tonkaduret. Moarvat ne c'hell ket un emsav ober berzh hep engroez hag hemañ ne gemer perzh en un emsav evit e lakaat da drec'hiñ nemet ma tamsant da vihanañ e arallekadur; hogen daoust da se ned eo an engroez nemet danvez an emsav ha n'eo ket ar c'heflusker anezhañ.

Eveljust ne c'hell an arallekadur - pe an direizher - bezañ santet nemet diouzh ma vir ar Vretoned emskiant eus o c'humun-elezh a bobl. Rak-se ez eo talvoudus n'eus forzh peseurt brud-erezh a c'hell startaat an emskiant-se. Ret eo anzav a-hend-all n'eo ket emskiantadur an arallekaat ur c'hoarvezad spontañ evit ur bobl pe ur stroll bennak dre vras. Skouer Vreizh a zo kendrec'hus er c'heñver-se : d'ar c'houlz m'o deus ar Vretoned damantet ar muiañ diwar o yezh gant ar gallekaat dre heg hag ar simbol eo ez int bet ar muiañ diglemm hag hirc'houzañvant. Hiniannoù hepken evel Yann-Vari Perrot o deus en emsavet. Kredapl eo eta ne c'hell ur bobl meizañ hec'h arallekadur nemet pa grog da vezañ diorreet en ur stumm bennak. Heñveldra a zo c'hoarvezet en Iwerzhon pe e-touez an dud didra. Kemeromp avat degouezh Iwerzhon : er XVIIvet, XVIIIvet kantved o deus gouzañvet ar muiañ Iwerzhoniz. En XXvet kantved o deus en em savet hepken; c'hoazh o emsavadeg a zo bet kaset da benn gant hini-annoù; ar bobl n'he deus kemeret perzh enni nemet a-c'houdevezh.

Atav e rank ar stourmerion chom war ziwall da zerc'hel an talvoudoù na c'hell ket an engroez gouarn e-unan. Kement-se avat ne c'hall bezañ sevenet nemet en ur bobl genurzhiat start. Ezhomm a zo eta eus ur riez kreñv e Breizh, pezh na dalv ket denel a zo diazezet war rezid pep hinienn eus ar gevredigezh. Moarvat ez eus ur gudenn da ziskoulmañ evit lakaat da gejañ an daou bennneb-se. Hogen un tu a zo da gevredañ ar Vretoned en ur gumuniezh difaout : ar yezh an hini eo. Adal bremañ e tle ar stourmerion strivañ da ober eus Breizh ur vroad vrezhonek warc'hoazh.

youenn olier

o o o

H E R V E A R M E

A - Z I V O U T D I S P A C ' H K U B A

I.- AN EMSAV-DEG ENEPSPAGNAT

Tost da aodoù Florida, ledet eo enezenn Kuba war 114.000 km², annezet gant c'hwec'h milion hanter a dud, hironed anezhc. Bro a ungounid, atav eo bet diazezet hec'h arboellerezh war ar sukr, gounezet en enezenn ha gwerzhet d'ar Stadoù-Unanet.

Trevadenn spagnat, biken n'en doa bet Kuba e stad vroadel pa grogas e 1669 da stourm evit e zishualded. E 1900, hervez kalennadurezh MONROE, e voe kaset armeoù gant ar Stadoù-Unanet war sikour ar Gubaned emsavet. E 1901 e voe rediet gouarnamant republik nevez Kuba, dindan c'hourdrouz un dalc'hidigezh soudarded, da lakaat en e gennadur ur pennad, anvet pennad PLATT, a roe d'ar Stadoù-Unanet ar gwir d'entenn emsellout en aferioù diabarzh an enezenn, da skouer o tegas soudarded, pep gwach ma hen kavfont ret evit "difenn ar buhezioù, ar madoù pe ar frankizoù hiniennel". Krennet he galloud dre bouez en emglev-se, ne ziskouezas ket ar stad kuban kaout kalz c'heant

herve ar me

da zifenn he finvidigezhioù ouzh ilboued he amezeg an Hanternoz, hag en un nebeut bloavezhioù, dre c'hoari an eskemmoù kanwerzhel, ar prenadioù douar ha greantioù, e vo perc'hannet arboellerezh Kuba a-bezh gant kevredigezhioù norzamerikan. Tennañ a raio un toullad Kubaned o mad eus ar stad-se, met izel a-walc'h e vo live buhez ar re all.

II.- AN OBERENNOU RAKZISPAC'HEL

Kemer a ra TATTISTA penn ar Stad e 1933 goude un taol reveulzi. Sellet da gentañ evel ouzh un adreizher kevredigezhel, ne zale ket da labourat dreist-holl da zastum madoù evitañ e-unan ha da vac'homañ e genvroiz. Bez' ez eus kalz strolladoù o enebiñ outañ, a-wechoù zoken strolladoù armet, met atav dinerzhed dre o dizunvanidigezh. Stoum a ra FIDEL CASTRO en unan anezho a vod studierien ha bourc'hizien, pa 'z eo dreist-holl ar gouerien, hanter poblañs Kuba, a c'houzañv.

An 26 Gouere 1953, taget eo kazarn ar Moncada e Santiago (proviñs an Orienta) gant bagadoù tud armet deuet eus diabarzh an enezenn ha renet gant CASTRO. Faezhet int en un nebeut eurvezhioù. Displeget o deus an emsaverien o raktras dirak o barnerien : kemer ur skinva da heul ar c'hazarn, ha lodañ an dispac'h er vro a-bezh dre zisplagañ o mennozioù a-zivout adranadur an douaroù dreist-holl. Goude o faezhadur e klaskont kendarc'hel gant ar stoum er rannvro veneziek añvet Sierra Maestra. Met a-benn eizh devezh int rediet d'en em zaskor d'al lu gouarnamantel dre ziouer a bourvezadurioù hag a aozadur, dre zianevezadur er rannvro. Paket holl, un darn a zo fuzuilhet hag an nemozant, gant CASTRO, toullbac'het. Divac'het triwec'h miz goude, FIDEL CASTRO en em harluas e Mec'hiko e-lec'h ma krouas "Emsav an 26 Gouere". E-doug an daou vloavezh da heul e priento e zigoll, koulz e Mec'hiko hag er Stadoù-Unanet. Bodañ ha gourdonañ a raio un nebeut soudarded dibabet mat evit o eneberezh da v-BATTISTA ha spisaat a raio e galennadurezh. Amañ e krog evit mat dispac'h Kuba.

III.- AN DISPAC'H

An 2 Kerzu 1956, e tilestras an Orienta eikont den armet, FIDEL CASTRO ha CHE GUEVARA en o fenn, o tont eus Mec'hiko war ar vag "Granma". Taget kerkent, un darn anezho lazhet, en am repuñont er Sierra Maestra, e lec'h ma n'emgavas nemet un tregont den bennak, ugent arm ganto ha ret dezho kerzhout dibac'houz evit chom hep bezañ paket. Nann digalonekaat, harpet un nebeudig gant kouerien ar rannvro e tagont ar 15 Genver 1957 ur c'hazarn bihan hag e chom an trec'h ganto.

Adalek an devezh-se e krog norzh ha niver an dispac'herien da greskiñ a-gevret hag er fiziñs lakaet enno gant tud ar vro. Diazezet mat en o strouezh dizarempredus da lu BATTISTA, e krogont da sevel ur gwir arme kuzh. Bodañ a reont kouerien yaouank ha gourdonañ anezho koulz war dachenn ar c'halvezerezh soudardal hag an deskadurezh dispac'hel. Sevel a reont skolioù, klañvdiou ha zoken stalioù labour. Kreskiñ a ra an dachenn douar en o dalc'h, darempredoù e skoulmont gant dispac'herien strewet er rannvroioù all hag er c'hêrioù, tostaat a reont eus Habaña hag adalek an 12 Meurzh 1958 e tiskleriont ar brezel hollet e-enep BATTISTA.

Guan-tre ez aio bremañ an traoù. En em unaniñ a ra ar Fidalourien gant strolladoù dispac'hell all; gounit a reont e Gouere emgann bras Jigüa hag ar c'hentañ Genver 1959 goude ma'z eo tec'het kuit BATTISTA e vez lakaet e plas an Habaña, gant asant FIDEL CASTRO, gouarnamant URRUTIA.

A-benn nebeut avat e kemer CASTRO ar galloud evitañ e-unan hag e krog gant e roll labour dispac'hel : adaoz ar glad, embannadur al lezennoù war pinvidigezhioù ar c'hondon, war deskadurezh ar bobl, hag all. O vezañ ma'z a an darn vuiañ eus al lezennoù-se a-enep interestoù ar Stadoù-Unanet e klask ar re-mañ diskerañ gouarnamant nevez Kuba. Hervez CASTRO e-unan ne reas o enebiezh nemet rediañ ar Kubaned d'en em harpañ war URSS hag herrekaat aozadur ur framm boutinour e Kuba.

Pa weler eo deuet bremañ Kuba da vezañ pennpont an emsav boutinour en Amerika ha pa lenner e levrioù CHE GUEVARA : "N'eo ket ken an unvaniezh etre ar bobloù-se (travadennet ha nevez dieubet) tra ar relijion, ar boazioù, an ervezioù, an dedennadurioù pe an diforc'hoù gouennel, met soudet eo gant damheñvalder an amlegadoù armerzhel ha kevredigezhel", e komprenner n'eo bet dispac'h Kuba nemet unan eus arvestoù ar stourm etre an hollzanvezouriezhoù kevalour ha boutinour kentoc'h eget un emsav broadel.

IV.- KENTELIOU AN DISPAC'H

Eus e skiantprenet evel kenrener an dispac'h en deus tennet CHE GUEVARA un doare reolennadur ar brezel dispac'hel displeget en e levr "Brezel ar strouezh". Daoust d'e levr da vezañ skrivet kentoc'h evit talvezout e broioù kalz nebeutoc'h diorreet ha kompenn eget Breizh, e c'hall bezañ talvoudus evit an holl anavezout un toullad eus e vennozioù.

Krediñ a ra GUEVARA ne c'hell un emsav dispac'hel bezañ diazezet nemet war ur rummad kouerien tavantak ha mac'homet o fellout dezho adperc'hennañ an douar lamet diganto. Reññ an douaroù d'ar gouerien a vo eta pal ha lusk an emsav, emezañ.

Ret eo ouzhpenn evit diazezañ un emsav dispac'hel armet kaout, eme GUEVARA, ur rannvro emsavus, da lavarout eo dizarempredus evit lu ar gouarnamant en abeg da skouer d'he zozsennadur ha d'ha glaevez.

Ur wech bodet an divizoù-se e c'hall ar stourm kregiñ ha kreskiñ heizez ar raktrou-mañ :

A)- Aozadur an dispac'h e diavaez br.

Ret eo bodañ, armañ ha gouzdonañ war-dro tregont pe pemont den.

B)- Dilestradeq - Buhez kantreer.

Ur strollad bihan en em guzh er strouezh. Tagañ a ra kazarnioù bihan pe kolonennadoù soudarded ha tec'hout kerkent. Kreskiñ a ra dre zarempredañ tud ar c'horn-bro.

K)- Stad kreiz - Buhez digantreer.

Sevel a ra ar strollad kampoù e diabarzh ar rannvro en e zalc'h (rannvro emsavus), gant skolioù, klañvdioù, stalioù, hag all. Embregañ a ra soudarded nevez, heñnezet gant armoù kemeret digant an enebour. Aczañ a ra e vitailhadur adalek er rannvroioù e lec'h ma vez labourer an douar. Sevel a ra un urzhiadur nann-soudardel oc'h ober er vro a-bezh war-dro bruderozh, titouerozh, tarverezh, hag all. Tagañ a ra an enebourien en hevelep doare hag o-pad ar vuhez kantreer met o vont pelloc'h-pellañ diouz ar c'hampoù-diazez. Ledañ e ra tachenn ar stourm dre gas strolladoù bihan da adkregiñ e rannvroioù all an hevelep buhez kantreer hag ar strollad penn en a-reok.

D)- An trec'h.

Kregiñ a ra an emgannoù war an "douaroù arvarus" (da lavarout eo an douaroù darempredet aes gant al lu gouarnamantel : an traoniannoù). Gronnet e vez ar c'hêrioù hag aozet enno harzoù labour. Bez' ez eus emgannoù bras hag en diwezh e vez kemeret penn ar stad gant an dispac'herien.

E)- Difenn ar golloud gounezet.

Ret eo diouzhtu lakaat ur melestradur hag un arme dispac'hel e-lec'h ar framm kozh, ha reiñ d'ar bobl un deskadurezh politikel.

Menegomp en diwezh ne gred ket GUEVARA, ha zoken ne seblant ket hotiñ, e c'hall ur vro sujet ober he dispac'h hep brezel. Ar brezel dispac'hel o vezañ evitañ an teuzlestr ma tauio dioutañ glanoc'h kelennadurezh an dispac'h ha krefvoc'h an dispac'herien.

)) o ((

LOEIZ LEMOINE

MARV SOKRATES

Ganet eo bet filozofiezh ar C'hornog diwar marv Sokrates. Moarvat ez eus bet "filozoferion" araozañ met n'hon eus koun eus Parmenides, Heraklites, Gorgias, Tales hag eus ar re all nemet dre ober Raksokrateion anezho.

Ar filozofiezh zo bet ganet diwar ar preder a-zivout marv "reishañ den e-touesk an dud". Pezh a gomprenas Platon ez eo ne c'halle ket un den evel Sokrates kenvevañ gant Broad Atenai evel m'edo : unan a zlee lazhañ egile. Kudenn Platon a vo gous-out penaos e tle ar Stad bezañ evit ma c'halle ar brederouriezh hag ar Vroad kenvevañ. Etre filozofiezh ha politikorezh, an enebadur a anataas al liamm.

Petra eo ar prederour evit ma c'hallfe ar Vroad kacut aon dirazañ betek e lazhañ ? M'en dije gallet Sokrates reiñ an ateb, marteze ne vijeket bet barnet d'ar marv, hogen Sokrates ne oa ket evit reiñ ateboù : ne rae nemet goulennoù.

Ober ur goulenn zo paouez buhezañ end-eeun, paouez arverañ an traoù end-eeun. Ha lavarout "end-eeun" zo dija bevañ evel prederour peogwir e lavarer e c'hall ar bed bezañ buhez et en un doare ha na vefe ket "end-eeun".

Ar brederouriezh zo forc'hellegezh. P'emañ an dud o vevañ e-kichen an traoù, e vev ar prederour en o donañ hag er-maez anezho. Goulenn : ti esti; petra eo...? zo klask ster an traoù, o zalvoud evidomp, ha bezañ gouest d'en em zistagañ diouto, eleze da grouiñ evito ur sellad nevez : ar bezañ er-maez eus an traoù evit o gouzout en o donañ eo ar brederouriezh.

Arvarus eo bet kavet ar brederouriezh peogwir e trehonte arver pemdezisk an traoù, peogwir e klaske o ster, o zalvoud-egezh. Hag e gwirionez, klask ster zo lakaat en arvar.

Sokrates zo bet drouklazhet hag en abeg da se e voe evit Platon ar politikerezh hag ar brederouriezh an hevelep tra. Ar Stad ne vo ket mui un dra gouzavet met an dra a zo da sevel. Ar filozofiezh hag an Istor zo bet ganet war un dro.

Peogwir n'o deus ket gallet ar Vroad hag ar prederour

kenvevañ, e teu, a-greiz-holl, ar goulenn war ar prederour da vezañ ur goulenn war ar Vroad. Hag evidomp-ni ivez, a zo o sevel ur Vroad ar goulenn war ar prederour, ar goulenn "Petra eo ar brederouriezh ?" zo ur goulenn war ar Vroad emacmp o sevel. Ar brederouriezh zo ur gudenn hon eus kejet outi en hor stourm.

Envel an traoù zo peurbadelezh, treamzerelezh. Stagañ un anv ouzh un dra zo krouiñ ur mennoz a zo keal an dra-se. Anv an dra a gomz deomp eus an dreamzerelezh met an dra anvet, en e hanvoud zo amzerelezh. Ar goulenn ti esti; petra eo...? eo a lak da emouezañ ouzh an amzerelezh, keal an amzer. Dre ar goulenn "ti esti" e tizoloer, n'eo ket un hanvoudelezh all, hogen forc'hellegezh an hanvoudelezh. Dre ar goulenn e vez dizoloet un daouad Treamezerelezh-Amzerelezh, ar goulenn zo trehontiñ an hanvoud amzerel davet unhanvoud treamzerel. Emañ an hanvoud en e hanvoud evel m'emañ an dreamzerelezh en amzerelezh hag an darempred a zo etrezo zo hini al lavar hag ar goulenn war al lavar.

Er ger "prederiañ" e kaver ar wrizienn "pred" o verkañ an amzer. Prederiañ zo amzeriañ. An amzer n'eo ket un aergelo'h ma veve emañ, an amzeriañ zo un ober. Amzeriañ zo buhezañ ar ster, hogen ivez, reiñ ster. Ne veve ket an amzer : n'eus amzer

ebet a vefe en hon diavaez : ober a ran va amzer, va amzer-elezh. An tremened zo dezhañ ar ster roet gant ar bremañ a zo luskad amzerel ar fellout-bezañ : n'eus eus va zremened nemet dre va bremañ a zo c'hoant sevel un dazoned. Va amzer-elezh zo an dra kemmus ha buhez va amzerelezh zo dibab ar bremañ.

Lavarout e vevan ar bremañ zo komz eus an trehontañ. Trehontañ an tremened dre ur reiñ ster dezhañ hag ivez trehontañ davet un istor am eus dibabet evit bezañ da-zont. Er bremañ e roan ster d'ar pezh a zo bet hag ez an davet un ober ster.

A-bouez eo merzhout penaos ez eo ar gerioù "ster" hag "istor" gerioù a-wrizienn. Ar ster hag an istor zo an hevelep hollad. Klask ster zo lakaat e vez buhez et an traoù evel arouezioù. Pa lavaran e vevan va zremened e lavaran ez eus em zremened devoudoù a zo evidon, er bremañ, arouezioù. Ster zo d'an devoudoù e-keñver un istor, hag hepken e-keñver un istor. N'eus istor nemet ma'z eus arouezioù, eleze, devoudoù gouest da vezañ ster dezho. Ar ster zo atav ster un dra bennak a c'houlenn ster hag an istor zo daelerezh etre an arouez hag ar ster.

An hanez zo ur sammadenn devoudoù a gemer talvoudegezh, eleze, a zeu da vezañ istorel dre ur sellad adalek ar bremañ.

Ar bremañ zo luskad amzerel an dibab, met ne zibaban devoudoù an tremened nemet gant mennad an dazoned. N'eus ster nemet dre ziforc'hañ luskadoù an amzer en o unded.

Evit na vezañ komprenet petra eo reiñ ster ha bezañ istorel e vez feuket tud 'zo peogwir ne gomzer ket eus Nevenoe e skolioù Breizh. Kement-se zo krediñ emañ ster Emgann Ballon "ennañ e-unan" en un doare ergorel. N'eo nemet hanezel Emgann Ballon evit ur Gall pe n'eus forzh piv n'eo ket broadelour breizhat; hanezel, eleze di-ster. N'eo un darvoud istorel nemet evit an hini en lak en un hollad amzer-ster a zo emañ un dazoned hon eus dibabet hag a zo dieubidigezh Vreizh.

Daoust d'an doujañs am eus evit Parmenides, Heraklites hag ar re all, em eus c'hoant keñveriañ rannvroelourion Vreizh gant ar re a veve gant keal amzerel an Distro Peurbadus. Ar Raksokrateion a veize an amzer en un doare estren d'hon hini hag e gwirionez ar rannvroelourion zo doare klafvourion an amzer. Evit na vezañ dibabet etre Bro-C'hall ha Breizh, daou ster, daou istor, er em gavont er-maez eus an amzer. Morse ne c'hallint sevel ur brederouriezh o vezañ n'int ket evit reiñ ster. An hini n'eo ket evit reiñ ster zo di-ster.

Emañ forc'hellegezh hanvoudel ar prederour en e zoare da vuhezañ ar bed. E lavar zo kendiviz an amzerelezh hag an dreamzerelezh. Emañ e hanvoud en e lavar, evel forzh piv, ha setu perak e hañval bezañ distag diouzh an hanvoudelezh pa gomz eus al lavar. Spi am eus, koulskoude, ne vo ket rebechet ouzh prederourion Vreizh bevañ er "c'houmoul", evel ma lavare Aristofanes. Spi am eus e vo komprenet talvoudgezh ar brederouriezh en hor stourm. Ar brederouriezh a vo evidomp un arnod : ar Vroad hag ar prederour a genvevo pe a genvarvo.

))o((

A B A N N A

UR BREDEROURIEZH VROADDEL

Ur general amerikan a lavare e 1946 : "Bremañ p'hon eus gounezet, emaomp o vont d'ober sevenadur". Ober brezel, ober sevenadur. Tud e Breizh a lavarfe a-walc'h : "Emaomp o vont d'ober ur brederouriezh vroadel", hep gallout koulskoude lavarout evel ar general amerikan : "Bremañ p'hon eus gounezet..."

Morse n'emeur o vont d'ober ur brederouriezh, morse n'emeur o vont d'ober ur sevenadur : ar palioù a gemerer pa saver ur brederouriezh, pe pa ziorreer ur sevenadur ne vezont nepred palioù prederourel na sevenadurel. Gwall glañv ar vro hag ar sevenadur a rank digeriñ "des Maisons de la Culture". Ar vuhez a gemer lec'h bepred da gentañ, ar preder a zeu er-maez diouti da c'houde. "Primum vivere, deinde philosophari" a droer alies dre "En em vevañ..." a intenter donoc'h : "Buhezañ da gentañ..." o reiñ ur geveskemenn da frazenn HEGEL : "Ar filozofiezh ne c'hall diluziañ nemet kudennoù he mare".

Moarvat e tisoc'ho ur brederouriezh eus hor buhezadur a-vremañ, hogen ar pal kemeret ganeomp er buhezadur-se n'eo ket sevel ur brederouriezh. Ur brederouriezh vroadel a vo ganet marteze, hogen n'hor bo ket loc'het war an amboaz : emaeomp o vont d'ober ur brederouriezh vroadel. Preder hor buhez zo korfet e prederioù termenet-mat evel : sevel ur Stad Vrezhon. Ar prederioù-se a c'hall genel ur brederouriezh; o fal n'eo ket genel ur brederouriezh; pal hor buhez zo genel ur vuhez wirionoc'h. Ur wezh ganet avat, ar vuhez wirionoc'h-se ne vo talvoudus d'an dud nemet dre ar pezh a hollvedel a vo enni, - eleze dre ar preder ganet en he ser ha degemeradus war-eeun gant mab-den.

Daouek e vez ar genel-buhez. Ur genel-tonkad hag ur genel-preder ez eus anezhañ bepred. An daou c'henel-se a van yevet; n'int ket an un dra koulskoude : en o diwan moarvat ez int an un dra, hogen disrannañ a reont; gant an eil e tamantomp ouzh hon dazont hag e vezomp Brezhon kent bezañ den, gant egile e tamantomp ouzh ar wirionez hag e vezomp den kent bezañ Brezhon. Disrannet emaint dre an daou zure'hadur a lakaont en hor buhez, padal ne c'hallont ket padout an eil hep egile. Sklaerius eo skouer Frañsizion Aljeria a vennas genel un tonkad pa na voent ket evit genel ur preder. An dispac'hoù trec'h eo ar re a vez evito an un dra ren un tonkad broadel ha diorren ur preder hollvedel.

Kudem an "engouestladur" a dizhomp amañ dre ar c'hostez, a voe diouzh ar c'hiz gant kefredourion Frañs goude an eil brezel-bed. Anv a veze e pep lec'h eus "littérature engagée", prederouriezh engouestlet, h.a. An "engouestladur" er ster-se zo anezhañ ur genel-tonkad war glask d'ur genel-preder a

garfe en em yevañ gantañ evit disoc'hañ. SARTRE da skouer, ha MERLEAU-PONTY ivez, a glaskas yevañ, imboudiñ o zonkad a C'hall-aeued ouzh ar preder komunour. Trement mareañ "tonkadek" ha "dibreder" ar Résistance, ne voent ket evit gouzañv pell ar brizhdimeziñ-se, hag evit ar gomunourion e voent buan razhed gludok. Ne voent ket e-se eürusoc'h eget o c'henvroidi eus an Algérie Française. Difazi war ar poent-se eo DE GAULLE; n'eus ket damantusoc'h egetañ da hengoun e vro, da yevadur ar preder hag an tonkad a reas Frañs. Marteze ne zegas ar buhezañ gall netra ken da vab-den hag emañ Frañs war naou he diskar, marteze e vo bet DE GAULLE kan a'n alarc'h ar c'hilhog gall; padal, ent-kalvezel e chom DE GAULLE ur skouer a vrogarouriezh. Ent-kalvezel, a lavaran, rak ent-vuhezel, gant ar samm a zireizhder a zo warni, n'eo ket genel ur vuhez wirionoc'h eo a ra Frañs. Ni dreist-holl, pezh a welomp anezhi eo emañ o c'henel en hor bro ur vuhez diwirion ouzh diwirion. Tonkad o bro avat a sell ouzh ar Frañsizion. Evidomp-ni, n'hon eus ket a-walc'h eus hon holl evezh evit damantiñ ouzh tonkad hon hini; mar gall Frañs kemerout hon aked, e vo a) e-keñver preder, evel skouer sevenadennoù ha c'hwitadennoù kalvezel ha buhezel, b) e-keñver tonkad, evel un draaezh a-dreuz a ranko dont eeun pe bezañ freuzet.

Ur genel-tonkad diles hag ur genel-preder diles ne c'hallont bezañ nemet dre vezañ an un dra en o diwan; kendiwan e vo ar preder brezhon hag an tonkad brezhon pe ne vo ket anezho, - diogeladenn ma tegouezh ganti ivez I. LEMOINE pa lavar : "Hor prederouriezh a vo prederouriezh hor stourm pe ne vo ket anezhi". Ar brasañ disfiz zo da gaout ouzh ar re a zeu d'an Emsav o tegas ganto ur brederouriezh dastumet e lec'h all. Pa lavaran se emañ

dreist-holl va devez gant luskadoù politikel evel ar M.O.B., an U.D.B.; c'hwitañ a raint keit ha n'o devo ket meizet an dra-mañ : an dispac'h brezhon eo a c'hano ar sokialouriezh e Breizh, n'eo ket ar sokialouriezh, zoken lesanvet brezhon, a raio e Breizh an dispac'h.

Splann e teu ivez amocedigezh atersoù 'zo chomet diateb. Evel : "Hor preder, hag unan broadel eo ?" - N'eo ket hor broadelezh a vo muzul hor preder, evel ma vez gant an impal-aerourion, hogen hor preder eo a zo muzul hor broadelezh. Tra an hollved eo hor preder. Mar deufe hor broadelezh a-dreuz d'e hent, hor broadelezh eo a vefe kondaonet. Drama Frañs eo hennezh : diskalfet eo ar preder gall en ur preder hollvedel hag ur preder broadel oc'h en em gondaonif an eil egile.

Evel : "Hor preder broadel, ha prederouriezh eo ?" - Hon tonkad eo a vo maen-touch pep prederouriezh; hon tonkad eo a vo dor deomp war ar brederouriezh hollvedel, rak pe breder a ve andon d'ar brederouriezh evidomp, panave ar preder a gavo an trec'h ganeomp, panave ar preder kendiwanet gant hon tonkad.

Tizhout a reomp aze kudenn an hollvedelezh, ar "philosophia perennis et universalis". Fleustret ez eus bet ervat warni e lec'h all gant L. LEMOINE(1). Lavarout a rin ouzhpenn ez eo dres ar preder ganet ha manet a-gendiwan gant un tonkad an hini gouestañ da ziraez an hollvedelezh, an hollbredelezh. An arallyevañ, giz Algérie Française pe ar Frañsizion Gomuncour, eo an hini hualetañ, ha dic'houestañ da vont a-gefle d'an hollelezh.

o o o

(1) L. LEMOINE, Keal an Istorelezh, Preder, 66/55, 1964.

A B A N N A

KEAL AR GWIRVOUD EN EMSAV

Ur brezhon yaouank a vez kaset d'ar skol c'hallek. Eno e kej bemdez ouzh tud lakaet eveltañ da c'hallegañ. Komz a ra galleg, en em ober a ra diouzh ar pezh a roer dezhañ da anavezout. N'eus ket evitañ kudenn a wirionded e-keñver bro. Ne vez na gwirion na diwirion bezañ Gall pe vezañ Brezhon. Bezañ Gall ha Brezhon ne vez ket evitañ muioc'h eget un degouezh.

Un deiz e kav n'eo ket gwirion ar stad m'emañ. Un degouezh n'eo ket, un direizh eo. Deskiñ a ra brezhoneg.

Komz ha deskiñ galleg zo em azasaat ouzh urzh an traoù o ren, bezañ pleustrek. Deskiñ ha komz brezhoneg zo em reizhañ diouzh un urzh a draoù n'eus ket anezhi c'hoazh met reizh, eleze bezañ gwirion. Dre vezañ gwirion, dre gemmañ yezh da gentañ penn, e teraouer seveniñ an urzh reizh-se.

Hiziv eo sklaer evidomp : bezañ gwirion, - lavarout a reomp c'hoazh : bezañ er gwirvoud, - eo em reizhañ diouzh an

urzh reizh, ha pa ve diveziat(1); bezañ pleustrek hepken, - lavarout a reomp c'hoazh : bezañ en dirvoud, - eo em azasaat ouzh an urzh veziat(1), ha pa ve direizh. Kempoell eo yezh ha buhez, ha ne welomp aze kudenm ebet.

Ar mennoz sklaer-se n'eo ket deuet d'e vent dindan un devezh. Hon remziad eo e gasas da benn. Disoc'h eo avat da bergont bloavezh prederidigezh eus an Emsav warmañ e-unan.

+

Istor keal ar gwirvoud en Emsav zo istor un eilpennadur. An eilpennadur dispac'hel a ran anezhañ, rak ar moull eo d'an emzalc'h dispac'hel e Breizh. Eeun kenan eo da vrasluniañ, pezh a rin amañ evit skoazellañ lenner ar rannbennadoù da heul:

	1. Breizh koezhzet	2. Breizh adsavet
A (1925)	<u>gwirvoud</u>	<u>hufvire</u>
B (1965)	<u>dirvoud</u>	<u>gwirvoud</u>

Goulenn a ran digant al lenner gwelout en daolenn-mañ ur braslun nemetken, ha dreist-holl mirout a sevel ataladoù jed-oniezhel etre an termenou anezhi. An div rezad A ha B a verk div stad eus framm an emskiant vroadel brezhon sellet diouzh savboent keal ar gwirvoud. Pevar zermen a lakaomp d'ober ar framm-se; er stad A : Breizh koezhzet, gwirvoud, Breizh adsavet, hufvire; er stad B : Breizh koezhzet, dirvoud, Breizh adsavet, gwirvoud. Arabat e vefe gwelout keñverioù furmel unvan etre

(1) beziat ag., a zo anezhañ; diveziat ag., ha n'eus ket anezhañ; kv.: ezveziad, divevoud.

an termenou; d'ar muiañ e c'haller lavarout : emañ gwirvoud A1 a-geñver gant Breizh koezhzet, emañ gwirvoud B2 a-geñver gant Breizh adsavet; an daou geñver-se avat n'int ket da vezañ meizet evel kevatal; heñveldra evit kement daouad keñverioù all a c'haller savelañ en daolenn.

Pal an daolenn-mañ eo diskouez penaos edo e 1925 keal ar gwirvoud stag ouzh mennoz Breizh koezhzet, ha penaos e voe tamm ha tamm distaget diouzh ar mennoz-se ha staget, evel n'emañ e 1965, ouzh mennoz Breizh adsavet, hevelep tremen a-dreuzveg eus A1 da B2 o verkañ an eilpennadur dispac'hel.

A-rack kregiñ e karfen ober un nebeut evezhiadennoù. Merkañ da skouer ez eus kendevedadoù en hor yezh eus gwir, gwirionez ha gwirvoud. Se ivez n'eo ket un degouezh, hag a-walc'h eo kemer un alberz eus hon lennegezh a vennozioù evit merzhout e teu alies ar gerioù-se gant pluen hor skrivagnerion. En e bennad Dremm ar Speredegezh Vrezhon (Studi hag Ober, 18/86, 1942) e tiskouez Maodez Glanndour pegen kizidik e vez ar Brezhon ouah keal ar Gwir, ha pegen tost emañ - dres evel m'emañ ar gerioù, - ar c'heal-se da geal ar wirionez : "Ni a fell dimp mirout ar wirionez war dachenn an ober, ha setu perak e anvomp ar Gwir, ar wirionez a zo dleet dezhi bezañ graet ganimp" (id.ibid./92).

Er frazenn-se emañ an Emsav hag an Dispac'h en o fezh.

+

Pa zigorer ur geriadur eus ar yezh lennegel evel ma voe stummet etre 1900 ha 1930 e kaver : gwirvezañ; gwirvoud : réalité. Gwirhañval eo e voe stummet ar ger gwirvoud gant Vallée evit reiñ ur c'hevatal d'ar galleg réalité.

E galleg, réalité zo ur ger deveret, evel ma ouzer, eus al latin res (tra), hag e ster boutinañ zo : "an traoù evel m'emañ", "an draelezh". E galleg, avat, ez eur deuet da hevelebiñ an daou veizad "an traoù evel m'o c'haver" hag "an traoù gwirion", "ar wirionez". "Je suis réaliste" a dalvez : "gwelout a ran an traoù evel m'emañ e gwirionez", ha war un dro : "pleustrek on". Anv zo ivez e galleg war an hevelep ster-va eus vérité, hogen ne weler ket mat ar c'heñverioù arverel a zo etre ar ger-se ha réalité. Gwezh e vez mesket an daou c'her, gwezh e vezont disrammet, hogen framm al lavar gallek ne verk hent spis ebet eus an eil d'egile.

An emsaverion vrezhon gentañ a zegemeras hep ober kudenn, an atalad : réalité = gwirvoud. Hogen réalité ar C'hallaoued n'emañ ket gwall bell diouzh hor pleustregezh, ha ne zaleas ket ar c'hudennoù da sevel.

Hag an emsaverion gentañ en em gavas buan en enkadenn-mañ: Breizh evel m'emañ, sujet gant an estren, o tizeriañ, o c'hallekaat, setu ar gwirvoud, setu ar wirionez, unan griz, na c'hellomp ket chom dall dirazi. Alese ar mesklavar-mañ : hon dlead eo stourm ouzh ar gwirvoud, ouzh ar wirionez-se. E-lec'h ober un adcell war ar gerioù ha dizarbenn ar c'hamm'heriañ a veze anezhañ doareañ evel gwir ar pezh na oa nemet beziat, e strivas ar skrivagnerion da lakaat o spered gant ar pezh a dlee reiñ an eneppeuz d'ar "gwirvoud" digalonekaus a gavent dirazo.

Ar frazenn vrudet : "Hon huñvreoù kaer a vo trec'h d'ar bed" a frealzas ur renziad emsaverion. Notomp en ur vont ar pouez a gemere al lennegezh en o freder.

"Evit gwir el levrioù e klaskomp ar pezh na gavomp ket "en hor buhez : ur vuhez all, heñvel ouzh hor buhez, ha "disheñvel koulskoude, stummet hervez c'hoant hor c'halon.

"Petra a glaskomp el lennegezh ? Ur stumm d'hon huñvreoù, "pa n'hellont ket dont da wir."

Roparz Hemon - 1925 (Ur Breizhad...p.120)

Enebet e veze an huñvreoù kaer ouzh ar gwirvoud kriz ha tefival. N'eo ket e veze dic'hoanag an emsaverion eus ar marehont, pell a se, rak, mar kouzhe o lavar e trap o yezh, e ouient gwarañ a-walc'h ster ar gerioù evit diankañ hag adkavout o feiz, e dicuer al lavar ret da reiñ korf poellek dezhi. An huñvre gaer a veze tonket da vezañ gwirvoud warc'hozh, tra ma veze tonket ar "gwirvoud" da vezañ huñvre fall dec'h.

+

Embannadur Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh e 1931 a verk derou prantad ar pezh a ra Abeozen "eil strollad Gwalarn" anezhañ. Evitañ da vezañ chomet kuzhet dindan ul lesanv, da vezañ skrivet nebeut, - ha c'hoazh da vezañ bet distrujet an hanter eus e levr gant ur vombezenn saoz, - ez eo Gawain aroueziusañ prederour ar prantad-se. Ar pennad Skiant Vreizh embannet war Gwalarn e 1941 a ranko bezañ studiet pizh gant istorourion ar preder brezhon.

Gawain, evel Roparz Hemon, a ra c'hoazh anv eus huñvre, hogen anat eo ar riskladur ster : an eilpennadur a ya war-raok. Huñvre Gawain ne deo ken kement-se gwirvoud warc'hoazh, hogen hini hiziv endeo.

"Ha mantret out : ar Vreizh hag a garez a hañval dit "ez eo un huñvre hepken, un huñvre pell, distag diouzh ar "wir vuhez.

"Mar dout kalonek, e strivez da seveniñ an huñvre-se, "pe darn anezhi da vihanañ. Hogen atav emaut prest da fall- "galoniñ, ha gwalleürus out bepred.

"Touellet out avat : ar pezh a anvez un huñvre eo da "Wir Vuhez. Hag ar pezh a anvez ar wir vuhez a zo nebeut- "oc'h eget un huñvre."

Gwalarn, 135/320-1

Lavarout a c'haller en em gav graet endeo a-spered an eil-pennadur. Strivañ a ra Gawain da ziskogellañ termenou ar rezad A; lakaat a ra zoken an elfenn gwir- da dremen eus ar bann 1 d'ar bann 2. Hogen re abred eo c'hoazh evit seveniñ dre ar geriadur e ziozeladurioù boudoniel. Henn prientiñ a ra avat, ha deskrivañ hir an "huñvre" :

"Ha bremañ, setu ni e toull-dor Skiant Vreizh : ar "froudemn, an huñvre-se, mar deo ken stag ouzhit, un darn "ac'hanout ez eo, evel da vrec'h pe da lagad, ha muioc'h, "- rak bevañ a c'hellfes hep brec'h na lagad, ha bevañ ne "c'hellfes ket hep da huñvre.() "Reuzeudik out, n'eo ket peogwir out divarrek da seveniñ "da huñvre, hogen peogwir out divarrek da gompren n'eo "tamm ebet un huñvre. An islonk n'eus ket anezhañ. An "huñvre n'eus ket anezhi. Er Vreizh a garez emañ o vevañ. "Eno emañ da Vuhez. Ha buhez wirion ebet n'eo'h eus e lec'h "all."

Gwalarn, 135/322-3

"Mil gwech o deus kredet ar Saizon o devoa trec'het "Iwerzhon, ha d'ar milvet gwech ne oant ket tostoc'h d'an "trec'h eget d'ar wech kentañ. Ha n'o deus ket komprenet "c'hoazh perak : i, ar Saizon, hag a gave dezho oant tud "ken poellek, ken "douarskiantek", ne oant evit gwir nemet "ur bern huñvrezion, sorc'het gant netra. Gant Iwerzhon "e oa an "douarskiantegzh"; gant Bro-Saon e oa an huñvre."

Gwalarn, 136-7/353

Fromus eo heuliañ kammed ha kammed darnodadennoù Gawain, rak o c'hlevout a reer evel poanioù genel hor spered e-unan. Ken talvoudus all eo e bennad III e-lec'h ma klask "diskleriañ

diazez Skiant Vreizh war dachenn ar brederouriezh", petra bennak na c'hallomp ken degemerout al lakadennoù anezhañ.

- "1. Ar "Boud" eo kement tra a zo.
- "2. An "Divoud" eo kement tra ne deo ket.
- "3. Div dachenn a zo er Boud : ar "Gwirvoud", anezhañ "kement tra a zo tost ouzhit ha pouezus evidout; an "Amvoud", "anezhañ kement tra a zo pell diouzhit ha dibouez evidout.
- "4. Da emskiant vreizhek, harpet gent da youl, a raio "dit diforc'h ar Gwirvoud diouzh an Amvoud.

(.....)

"Mar dout reuzeudik, ez eo peogwir e levez traoù glac'har- "us (evel stad izel da vro, diskar da yezh, aloubidigezh giz- "ioù estren, hag all) da bouezañ warnout ha da levezon. "ac'hanout; peogwir e renkez an traoù-se er Gwirvoud. Bez' "ez eo ivez peogwir e sellez ouzh traoù laouenaus (evel gred "ar wir Vreizhiz, adsavidigezh ar yezh, dasorc'hidigezh al "lennegezh, hag all) evel traoù dibouez ha dilevezon; peo- "gwir e renkez an traoù-se en Amvoud.

"Ez kalloud eo koulskoude reizhañ da Wirvoud ha da Am- "voud. Rak gwirvoudegezh hag amvoudegezh a gemm hervez da "spered."

Gwalarn, 136-7/354-5-6

Anat eo skoilhoù yezh Gawain; hag evitañ da loveal ampart, ha kinnig kemennadurioù a zo bepred degemeradus, ne c'hall ket mirout a risklañ a-benn an diwezh en idealouriezh.

+

Dellid Gawain eo bezañ kaset an eil-pennadur dispac'hel ken pell ha ma oa gallus gant tud ha gant yezh e vare.

Skoilh pennañ yezh Gawain eo ober ar Boud eus "kement tra a zo er bed". Dik d'ar c'hentañ sell, an termenadur-se zo tou- ellus. Penaos termenañ ar bed ? Hollad ar "bouioù" ? Ha petra eo : bezañ er bed ? Meur a zoare zo da vezañ er bed : un den

abanna

n'emañ ket er bed en hevelep doare hag un dra; aes eo dinac'h "gwirvoud" ur wagenn er mor, penaos dinac'h avat "gwirvoud" un den ha pa vefe dioutañ gwashañ enebour Breizh ? Ha mat eo teurel en "amvoud" an darnvuiañ eus poblañs Vreizh war zigarez ma'z a divreizhek ? Anat eo n'he deus ket Breizh ur "voudegezh" kevatal da "voudegezh" ar wagenn distaget gant hor sell war c'horre ar mor, nag ivez da "voudegezh" an enebiezh a vag outi hec'h enebourion pe an digasted a ziskouez outi he fobl. Ar boudegezhioù-se ne c'hallomp anavezout nemet en o genezh, ha direizh e ve ober, evit abegoù estren d'o genezh, gwir-, ampe di- voudegezhioù anezho.

Mab-den n'en deus ket ar galloud da dreifi evel ma kar, pe diouzh an ezhommoù, ha pa vent ar re zoniañ, eus e spered, boudegezh an traoù a zo er bed. Ar galloud en deus avat d'en em dreifi eñ e-unan pe war-du ar pezh a zo, pe war-du ar pezh n'eus ket anezhañ, pe resisoc'h, ar galloud-durc'haat ken ouzh ar beziat, ken ouzh an diveziat. Kemeromp skouer ar barzh, peogwir ez eo an hini asañ da verat, - o c'houzout e verkomp aze ur galloud hollek eus mab-den. Ar varzhoneg emañ o vont da sevel, bremañ endeo emañ troet war-du enni. N'eus ket anezhi, ha padal emañ ar barzh durc'haet outi kalz muioc'h eget ouzh an traoù a zo anezho. Ha p'emañ ar barzh durc'haet outi, hag-eñ e c'haller dinac'h pep boud outi ? Ar respont d'ar goulenmañ diwezhañ ne vern ket amañ, hogen evit ma c'hall ar yezh bezañ e-tro da bleustriñ dereat warnañ, e ranko en a-raok savelañ un diforc'h etre boudegezh an traoù a zo anezho er bed, ar beziadoù, hag ar boud e-unan.

Eus ar beziadoù e lavarer ivez ez int gwerc'hek : an avel war ar mor, o lakaat gwagennoù da sevel, ar varzhoneg a lennan,

o lakaat from ennon; ar beziadoù a ziskouez gwerc'hegezh an eil re e-keñver ar re all. Un urzh all a werc'hegezh zo : ar galloud-durc'haat n'eo ket diwerc'hek e-keñver bed ar beziadoù, evitañ da vezañ gwerc'hek en e geñver ent-disheñvel diouzh an doare m'o deus ar beziadoù da vezañ gwerc'hek. Genel ur varzhoneg a emleg bezañ bet durc'haet ouzh an diveziat; gwerc'hegezh an durc'haat e-keñver ar varzhoneg n'eo ket hini an avel e-keñver an tonnoù, nag hini ar varzhoneg ur wezh graet e-keñver ar from a laka el lenner, n'eo ket ur werc'hegezh veziadel, hogen ur werc'hegezh-vammenniñ e-keñver ar beziadoù; emañ en diagent d'ar veziadelezh; emañ ar galloud-durc'haat e par geneliezh ar beziadoù. Anat eo ne c'hall bezañ a zispac'h hep ar werc'hegezh-vammenniñ.

Kammhentadur Gawain eo bezañ manet e par ar beziadoù, krediñ edo aze gant ar Boud en e wirionez. Mar hor bez keal eus ar boud dre ar beziadoù, n'eo ket ar beziadoù ar pep hollañ, nag ar pep boudekañ, eus ar boud. Ur wezh hevelebet ar Boud gant ar beziadoù, e rank Gawain didroc'hañ al lodenn anezhañ na deo ket evit he degemerout ("stad izel da vro", h.a.). Rannañ a ra ar beziadoù e daou rumm : ar re a zoug testeni a-du gant Breizh, ar re a zoug testeni a-enep Breizh. Ouzhpenn ma c'houlaka gant kement a zo er bed keñverioù splann ha diforc'hellek gant Breizh, e laka war meizad ar bed un torgammerezh dic'houzañvadus : ur Feurvoud o teurel e sklerijenn war bep tra e teu Breizh da vezañ; kement tra a zegemero ar sklerijenn a anvor Gwirvoud, kement tra a chomo teñval a daolor en Amvoud.

Na welomp ket aze eztaol ur vroadelouriezh vac'hom, - daoust ma tiazaz riezoù 'zo o mac'homerezh war ur bedarvezif ken eunik all. Gwelomp kentoc'h ar preder brezhon e gwentloù e wilioud.

Anat eo en em gav dispartiet bed pep oberer hervez prant-adoù an ober etre beziadoù a-du ha beziadoù a-enep. Hag orin an disparti n'emañ ket er beziadoù o-unan, kement-se en deus Gawain gwelet fraezh. Ar fazi a ra avat eo klask lakaat an orin-se er beziad Breizh.

Un diren zo d'ober, na reas ket Gawain. An diren-se eo tremen eus ar sell bac'het er veziadelezh, d'ar sell emsaver. Dre ar sell emsaver e venegan da gentañ ur sell diazezet er galloud-durc'haat. An emsaver, - hag-efñ n'eo ket amañ ster don ar ger ? - eo an hini a en em zalc'h en diagent d'ar veziadelezh, - ha da veziadelezh e vro gouezhet, - hag a zo durc'haet ouzh e vro adsavet. Un anaoudegezh dik en deus eus ar beziadoù, eus e vro gouezhet hag eus stuz e genvroiz bac'het er gouezhidigezh, eus enebourion e vro hag eus an tunioù a stignont evit he mirout a adsevel. Anaout a ra dik ivez evel tra diveziat ar vro adsavet ma turc'ha outi. Al lagad a doull hent an dorn : evel ma ouezas ar sell divac'hañ diouzh beziadelezh an diskar, e ouezo an dorn genel beziadelezh an adsav.

Neb a vez bac'het er veziadelezh, neb a gemer e stur er veziadelezh, ne ra nemet em azasaat ouzh ar beziadoù ha menel en o redi. Stad an darnvuiañ eus tud Vreizh er mare-mañ eo; klask a reont en em ober evit ar gwellañ diouzh ar roued dir taolet warno gant an estren, eleze plegañ, kilañ, koazhañ, diskrognal a-benn gorrekaat rikl an tag, divroañ en diwezhañ... Da grediñ eo n'eo ket divac'het evit c'hoazh ar selloù a vlegno an daouarn da ziregiñ mailhoù ar vac'h.

+

+

Enebet hon eus uheloc'h, e sigur ar Brezhon yaouank o tont d'an Emsav, ar bezañ pleustrek hag ar bezañ gwirion. Gwelet hon eus n'o devoa ar gerioù "gwirion" ha "diwirion" ster ebet evit neb a vez bac'het er veziadelezh. Ur Brezhon o tont gwirion a zeu da emsaver. Dont da emsaver zo tostaat ouzh ar Vrezhoned all. Rak bezañ gwirion ne empleg ket e pell-aer diouzh ar beziadoù, hogen, er c'hontrol, oc'h en em lec'hiañ en diagent d'o beziadelezh e kemerer damant d'o zonkad hag en un doare e sammer o zonkad.

Setu perak, pa voe meizet an dont-emsaver evel un dont-gwirion, e kavas ar ger gwirvoud e lec'hiadur. Ar bezañ pleustrek a empleg keñverioù etre beziadoù hepmuiken; ar bezañ gwirion a empleg ur c'heñver etre mab-den hag ar gwirvoud.

Kentoc'h eget lec'hiañ ar gwirvoud da gentañ ha klask ar wirionez ennañ, e lec'hiomp ar wirionded da gentañ hag e fiziomp warni evit merkañ deomp ar gwirvoud : ar gwirvoud eo ar pezh a savelomp gant ar sell hag an ober emsaver. Aze ez adkav yezh koulz ha meiz o c'hempoell. N'eus amañ netra a gement na ve bet en Emsav abaoe pemont vloaz, hogen dezrevellet eo en doare ma ouezo an emsaver derc'hel gant an ober hep paouez bezañ gwirion.

Dre enebadur ouzh ar gwirvoud, e reomp dirvoud eus ar boud evel n'en anavez bac'hidi ar veziadelezh, eleze ur boud estren a-grenn d'ar preder da vezañ gwirion, boud an azasadur, ma teu ennañ da stadoù-natur ken ar bezañ faezher, ken ar bezañ faezhiad, ma kenvev ennañ e peoc'h mac'homer ha mac'homad. Ar gwirvoud eo ar boud buhez evel rezid, an dirvoud ar boud buhez evel redi.

o o o
o

Y O U E N N O L I E R

P E T R A E O A L L A B O U R V A L L U S A Ñ ?

Kudenn ar stad broadel

Lavaret em eus atav ne c'helle ket tremen Breizh hep stad broadel. Kement-se n'eo ket goulennet hepken gant hor gwirioù istorel hogen ivez gant retderioù hor stourm adal ma fell deomp dero'hel Breizh en he sav, he yezh, he sevenadur, hec'h armerzh, war un dro. Ne vern piv a zo a-du gant Breizh eta, hervez ar reizhpell, en deiz a hiziv ma emell ar stad e pep skourr eus ar vuhez kevredigezhel a rank goulenn ar stad a-gevret ganeomp.

Perak ne gred ket ar Vretoned na darn eus ar re a stourm evit ar yezh goulenn an emrenerezh ?

Evit un abeg dreist-holl. Kavout a ra dezho ez eo di-c'hallus tizhout an emrenerezh-se. D'am soñj ez eo hemañ an digarez pennañ rak distanet eo kalz ar gred gall e Breizh, dreist-holl abace m'eo bet kollet Aljeria gant Bro-C'hall.

Daou seurt eo an di-c'halluster a harz ouzh savidigezh ur stad broadel, hervez a gred ar Vretoned. An anaoudegezh hag ar skiant-prenet o deus a natur ar stad gall kreizennet o lak da veizañ ne vo biken roet da Vreizh an disterañ emvelestrerezh. D'an eil, n'o deus fiziañs ebet en un emsav ha na ziskouez ket bezañ mennet nag urzhiat start. Anat eo dezho ez eo di-c'houest a-grenn da dapout an emrenerezh dre gaer pe dre heg. Rak-se ne

youenn olier

zeuont ket ennañ. Kement-se n'eo ket souezhus goude pevar c'hantved a sujedigezh. E 1940 o deus ar C'hallaoued, a vras, degemeret ar Faehidigezh ha kement a zeue da heul.

An hent d'ar frankiz

E seurt degouezh ez eo an hent nemetañ an emsavadeg a ro fiziañs d'ar bobl drec'het hag a bourchas diouzhtu ar framm stadel ma c'hell ar bobl en em stagañ outañ.

Hervez ar reizhpoell e tlefed eta labourat e sell da se ha gwirheñvel bras eo ne vo tizhet biken an emrenerzh hep tremen dre ur pennad a emsaverzh dre nerzh. Ret eo d'ar stourmerion soñjal en disoc'h-se eus o ober adal bremañ ha d'ar re a zo douget d'ar c'hudennoù-se prederiañ adal bremañ diwar o fenn.

Pegoulz ?

Ur wall gudenn hon eus avat da ziskoulmañ. Daoust ha pegoulz e c'hell bezañ kaset da vat seurt emsaverzh gant ur c'hañs bennak d'ober berzh ? Div gudenn a sav amañ : ur gudenn bolitikel hag ur gudenn vuhezal a zo kemmesket a-hend-all an eil gant eben.

o
o o

E meur a geñver e c'heller soñjal n'eo ket azv an emgav politikel gall hag europat evit ur politikerezh breizhat a nerzh. Ur vroad distar a-walc'h evel an hini gkastilhat a c'hell mirout c'hoazh hiziv, pa ne c'hoari roll etrevroadel ebet, ur spered impalaerel diazezet war hengoun he meurded tremenet. Heñvel eo evit Bro-C'hall a zo renet bepred gant impalaerelourion goude m'eo kollet an impalaeriezh. Hogen brudañ a reer bremañ ar gumuniezh c'hallgomzerez. En em sevel a reer a-enep d'an Amerikaned netra nemet evit diogeliñ dishualded Vro-C'hall.

Aozañ a reer un tammig bombezenn netra nemet evit kaout an anv a c'halloud atomel. Bannañ a reer en ec'honder loarig-

anigoù-c'hoarielloù evit kaout an titl a c'halloud egerel. Kement-se avat ne reer ket evit ar pobloù all ha na c'hellont ket bezañ touellet hogen kentoc'h evit ar bobl c'hall hec'h-unan⁽¹⁾ he deus kavet hec'h unded dreist-holl er brezelioù impalaerel a bep seurt hag a zo war var da goll hec'h emskiant ma koll an emc'hloer en deus bevaet anezhi abaoe he ganidigezh.

Emgav ar stad gall a hiziv.

Ret eo merkañ avat dislavaroù diabarzh ar gouarnerezh gaolat a hiziv.

Ar re a zleje bezañ harpet D.G. o deus kasoni outañ. Me 'fell din komz eus ar re o doa ar spered impalaerel gall rik, kostezenn dehou ha sternioù an arme c'hall. Kement a gerse o deus bet o koll Aljeria hag an trevadennoù ma troc't bremañ war-du Europa. Ar "Fédération des étudiants nationalistes" e Roazhon da skouer, a ra bruderezh evit Europa. Miliadoù a ofisourion o deus kuitaet an arme c'hall abaoe m'eo echu brezel Aljeria.

En un doare dic'hortoz krenn ez eo sikouret D.G. hag eñ dehouad ent-anat gant darn eus ar gostezenn gleiz, abalamour d'e bolitikerezh "dishual" enep-amerikan. E gwirionez eo ar politikerezh-se anienel rik, awenet gant al "lorc'h" broadel kentoc'h eget gant ar poell; n'eo ket prederiet don, tamm ebet. Ne vern ! Hiziv an deiz ez eo meulet D.G. gant Sinaiz dreist da gKosigin !

Dislavaroù all. D.G. a zo frankizour ha fellout a ra dezhañ ober ur politikerezh a nerzh, a veurded hag a lorc'h. Dre ma'z eo frankizour e fell dezhañ kaout asant an dud dre gaer : uhelaet e vo eta rez-bevañ an dud ar muiañ ma vo tu, a-benn o stagañ ouzh ar gouarnerezh.

Se avat ne c'heller ket seveniñ da vat dre ma koust ker ar politikerezh a veurded. Diouz un tu all, n'eur ket evit tremen a-grenn hep ur pclis politikel; peogwir avat e venner bepred chom frankizour ne ouller ket reiñ da hemañ re a c'halloud; rankout a reer mirout outi a vont re bell (afer Ben Barka). Se avat adarre a zo kollus evit brud-vat ur gouarnerezh hag a lez pep frankiz d'ar c'hellaouennoù, h.a.

(1) Da skouer, ez eus bet graet abadennoù ispisial er skinwel diwar-benn Zabalon, al loarigan, evit ar vugale. 10 pe 15 abaden a zo bet gouestlet da gur ar galvezourion c'hall.

Kement a zislavaroù a zo er gouarnerezh diazezet gant D.G. ma ne c'hell ket padout pell-tre e-giz m'emañ. Pe e ranko kaletaat hag en em harpañ war ar c'hendereoù a-du gant an Urzh dre hengoun hag a zo bet gwall zisouezhet gant di-soc'h brezel Aljeria - hogen kement-se ne c'hell c'hoarvezout nemet en tu all da zilañ pe da varv D.G., war var da reiñ lañs d'ur brezel diabarzh e Bro-C'hall - pe e ranko derc'hel d'ar frankizouriezh ha d'ar c'houlz-se dilezel ar politikerezh a veurded.

Bez' ez eo ar politikerezh gaolat eta ur politikerezh da c'hortoz, ur gilstourmadenn, ur politikerezh touellus kentoc'h eget ur politikerezh gwirion. Neur a vunud henn diskouez. Da skouer n'en deus ket gallet D.G. terriñ an dar-empredoù gant an Amerikaned, lakaet en dije bet c'hoant. N'en deus ket gallet zoken disteurel ar C'henvare'had. Ha goude bezañ kaset kuit Bro-Saoz, goude bezañ stlapet an norioù e Brussel en deus ranket dont da godianañ e Luksembour'h. Kement-se a ziskouez eta n'eo ket dieub ar gouarnerezh gaolat. Stag eo ar gouarnerezh-se ouzh strolloù armerzhel zo ha rank-out a ra a-wechoù ober diouzh o ali. Ar re-mañ avat ne felle ket dezho e vije gouledet ar C'henvare'had ha rak-se en deus ranket plegañ ar gouarnerezh-mañ.

Evel-se eta ned eo ar gouarnerezh gall a hiziv nemet un tremenlec'h hag ur c'hempouezlec'h etre an tremened gall impalaerel hag an dazont gall europat, etre ar gostezenn gleiz a harp e bolitikerezh "dishual ha neptu" (da welout) hag ar gostezenn dehou a gav mat e neptuegezh a-du c-keñver an Iliz, etre mennadoù armerzhel an dcknokrated arc'hantourion ha mennadoù politikel ha buhezel ar gostezenn dehou gozh. Didalvez e vefe klask un diskoulm da gudenn Vreizh dindan ur gouarnerezh gall a zo tonket da vont da get.

Anat eo eta ez eo a-du gant mad Breizh gortoz c'hoazh e-pad ur frapad arak kregiñ gant un obererezh taer a-walc'h. An amzer a labour a-du ganeomp. Da gentañ, hor pellaat a ra diouzh hanterenn gentañ an 20vet kantved en deus kaset ar vrogarouriezh c'hall d'ar barr-uhelañ. Marv eo an darn-vuiañ eus emganerion brezel 14, ha krog eo da louediñ hengoun ar resistañs. Maget eo bet ar spered gall, evel pep spered impalaerger gant an anien tagañ-empifenn. Klenket dre gaer pe dre heg en Europa ar C'hornog hag er bloc'h atlantek, dic'houest d'ober brezel ebet o-unan, gwarezet en despet dezho gant

an Amerikaned, e ranko ar C'hallaoued koll o gred impalaerel a-gent muic'h-mui en amzer-da-zont. Moarvat e kozho hemañ goustadik ha padout a ray keit ha D.G. da vihanañ. Hogen arabat ivez ankounac'haat ez eus ul luskad kregiñ a-du gant Europa er stad gall end-eeun hag e vo aes un deiz en em harpañ war hemañ evit tizhout hor mennadoù. Ar skiant a c'houlenn eta e c'hortoz-femp a-raok kregiñ gant un oberiadenn a nerzh bennak.

Ar furmez her gouenn ivez rak ne c'hellomp foraniñ buhezioù tud a dalvoudegezh ha danvez-renerion en amez.

Ur gwall heuliad a zo da gement-se avat. Mont a ray da get muic'h-mui ar brezhoneg poblek e-pad ar prantad-se ha dav eo deomp soñjal adal bremañ el labour advrezhonekaat a vo da gas da benn adal ma vo bet savet ar stad broadel.

Pal pennañ ar stad broadel e vo adober ur vroad eus Breizhis, ober ur bobl geltiek eus ar Vretoned. Hogen ma n'eo ket hor rummad-ni - ha setu an dalc'h - evit sevel ar stad broadel e unan e tle evelato brudañ keal ar stad-se, ha dreist-holl al labour en devo da gas da benn : an adkeltiekaat.

Strollad ebet avat ne vrud al labour-se evit ar poent. Evel-se eta e kav din e tlefe ar vroadelourion klask dont war an dachenn foran dre sevel da gentañ, da skouer, ur strollad sevenadurel a vefe karget da skignañ mennad an advrezhonekaat. E bal e vefe lakaat menoz an dud e Breizh da gemer skiant eus enkadenn ar yezh. An tu e vefe savidigezh ul levr gwenn diwar-benn gwir stad ar yezh poblek. Arabat kaout son rak duañ an daolenn rak forzh penaos e oar an holl dud ez eo barnet ar yezh poblek d'ar marv. Pezh a zo a bouez eo lakaat da ziwanañ e spered an dud e c'hell hag e tle ar yezh - unvan en dro-mañ - bezañ adsavet.

Hentennoù.

Kavout a ra din e vefe mat adkemer hentennoù ar "Brezhoneg er Skol" gwechall, da lavarout eo, lakaomp, mont da gavout ar c'huzulioù-kêr, displegañ dezho stad ar brezhoneg ha kudennoù an advrezhonekaat hag o lakaat da vouezhiañ en ur stumm bennak, ur mennad a yafe a-du gant hor raktresoù. Ar pezh a zo a-bouez e vefe anavezet ar gudenn evel m'emañ, hini ar yezh vroadel da adsevel er vro end-eeun m'eo bet distrujet gant ur galloud estren. Ma ne zeuomp ket a-benn adal bremañ da lakaat menoz

an dud da gompren gwir elfennoù kudenn ar brezhoneg ne c'hell-
imp ket aes adsevel hor yezh warc'hoazh goude ma vije diazezet
 ur stad broadel. Krediñ a ran n'eo ket dic'hallus sevel seurt
 strollad an deiz a hiziv ma n'eo ket mui ken lemm an enebiezh
 war dachenn ar yezh hag ar sevenadur etre skourroù an emsav
 ha ma c'heller spiañ zoken un tamm kenlabour etre stourmerion
 ar c'hostezennoù disheñvel.

AN OBER POLITIKEL RIK

Anat eo ivez e tleimp tremen dre ur marevezh a vruderezh
 politikel broadel ivez, a-raok kregiñ gant ne vern peseurt
 obererezh all. Dav eo d'ar vrogarourion adal bremañ termeniñ
 diazezoù ur strollad breizhat a c'houamamant goude ma ne ve
 ket ar strollad-se ar strollad nemetañ e Breizh. Ar strollad-
 se a vo da aozañ penn-da-benn, adal netra. Ar gelennadurezh
 a zo da gempenn c'hoazh.

A-raok komz anezhañ e ve mat burutellañ ar strolladoù
 politikel breizhat a zo bet savet betek-henn.

o

Krogomp gant ar M.O.B.

Stad ar M.O.B. a zo diaes e derou ar bloaz 1966. Diouzh
 un tu en deus kollet abaoe bloaz hanter levedoù pouezus a-walc'h
 a roe tu d'ar strollad da embann ar gazetenn "L'Avenir" div
 wech ar miz. Diouzh un tu all ez eo bet dinerzhet da gentañ
 gant an tabut etre kleizidi, etreidi ha dehouidi. Disoc'het
 eo an tabut-se d'an disrann etre an askell gleiz hag ar peur-
 rest eus ar strollad e 1964. An disrann-se a c'heller diskler-
 iañ e meur a geñver. Kavet he deus hec'h andon en enebiezh ar
 personelezhioù hag ar rummoù, Renerion an U.D.B. savet diwar
 an disrann a zo anezho studierion, muioc'h a zeskadurezh dezho
 alies eget d'an darn vuiañ eus ar re a oa e penn ar M.O.B.
 (seurt enebiezh etre rummoù ha personelezhioù a gaver en
 holl strolladoù politikel ha bepred o devez bet komzourion
 koulz ha katoliked bec'h gant o studierion, kv. ar J.E.C. e
 Bro-C'hall nevez 'zo da skouer). Ar gwashañ 'zo eo en deus
 kendalc'het an tabut war-lerc'h disparti partred an U.D.B.,
 an hevelep tabut atav etre amokourion, sokialourion, etreidi
 hag an askell dehou a zo disoc'het da ziskleriadenn Gendalc'h

1965 e Roazhon a-du gant ur stumm bennak a sokialouriezh
 vreizhat. Evel m'emañ ez eo bet an diskleriadenn-se frouezh
 un treuzvare'had ha n'en deus laouanaet na sioulnet den ebet.
 Pezh a c'haller tamall da seurt diskleriadenn eo n'eo ket
 diazezet war ur gelennadurezh resis diwar-benn ar gevredigezh
 hag ez eo bet savet war ar prim e sell da ezhommoù ar bruderezh,
 lakaet eveljust e tlefe luskad ar menesioù e Breizh emdreiñ
 war-du ar sokialouriezh. N'eus mar ebet ez eo aet ar menoz
 foran e Breizh war an tu kleiz abaoe ar brezel diwezhañ, hogen
 dav eo deomp gwiriañ ivez ez eo e Breizh en deus kavet D.G.
 hag e gostezenn, pe ar gostezenn etre ar muiañ a vouezhioù ar
 stad gall : 70 % eus ar Vretoned a zo eus ar gostezenn etre
 pe zehou dre vras. Dislavar a zo e gwirionez etre kempennour-
 iezh ar M.O.B. a lakae e spi betek-henn e aozadur ar stad gall
 hag Europa, hag ar program sokialour a ginnig bremañ. E-barzh
 bro ebet ne c'hellfe seurt program bezañ lakaet da dalvezout
 hep un dispaq'h bennak.

Diwar wardenioù all e c'houzañv ar M.O.B. Ar re a rene
 anezhañ mui pe vuil betek-henn hag int aet war an oad, hedro
 ha dispis a-walc'h o emzalc'hoù hag o dibaboù e-kerz o red
 politikel n'o deus ken fiziañs ar rummad war-lerc'h. Dre vras
 ne gaver er M.O.B. na personelezhioù dreist na renerion. Chom
 a ra ennañ dreist-holl ar vrogarourion ha n'o deus ket gallet
 deskiñ ar yezh vroadel hag a ouestl o amzer d'ar bruderezh
 politikel. Broadelourion a zo eveljust eus ar stourmerion,
 dreist-holl ar re yaouank hag a zo taer. Al labour a vruderezh
 a zo kaset da benn ganto a zo a-bouez ha war an dachenn-se
 moarvat e rankfed o harpañ. Anat eo ivez avat ne zegaso an
 urzhiañ-se diskoulm ebet da gudenn Vreizh.

o

An U.D.B. ne ray ket kennebeut ha marteze nebeutoc'h.
 Mard eo gwan ar M.O.B. ez eo gwanoc'h c'hoazh ar strollad-mañ
 ha pezh a c'heller tamall dezhañ ez eo bezañ ganet evit darn
 diouzh degouezhennoù politikel resis ha n'o doa netra da welout
 war-eeun gant kudenn Vreizh. Ar studierion yaouank a zo bet
 kiriek dezhañ a zo bet stummet e-pad brezel Aljeria gant kel-
 souennoù gall eus ar gostezenn gleiz evel "L'Express" pe
 "France Observateur", ar P.S.U. gall, h.a.

Soñj hoc'h eus moarvat e oa bet goulennet digant kendalc'h ar M.O.B. bodet e St Briege, e 1962, a gav din, mouezhiañ ur mennad a-enep d'an O.A.S. Gwir eo e oa un dispac'h dehou-pellañ o c'hoiñ d'an ampoent er stad gall ha gouzout a ran ez eo estren a-grenn ouzh Breizh hag ar pobloù keltiek all faskouriezh, un-renouriezh, menoziadeg ar gostezenn c'hall dehou pellañ dre vras. Hogen graet en degouezhennoù a neuze he defe diskouezet hevelep diskleriadenn gwander an emsav dre vras dreist pep tra. Ne vije bet anezhi nemet ur "captatio benevolentiae" a-berzh un emsav dister e-keñver ur galloud trec'h dezhañ a-galz. Ha lakaomp e vije bet aotreet an emsav da grakveañ dindan ar gouarnerezh gall trec'h eus an tu kleiz, en defe kolllet ivez e frankiz. Ken didalvez all e vije bet un diskleriadenn a-du gant an O.A.S. ma vije bet trec'h ar gostezenn-se a-c'houdevezh.

Mat e ve amañ, a gav din, burutellañ emzalc'h diazezerion an U.D.B. pe hini rannvroelourion ar gostezenn gleiz dre vras. Pezh a zisplij din eo e kemeront un emzalc'h gwan e-keñver danvez mistri ar stad gall warc'hozh, degemeret evel just e c'hellfe Bro-C'hall kavout un deiz ur gouarnerezh eus ar gostezenn gleiz en amzer-da-zont.

Ur rebech all a rin a zo stag ouzh hemañ. Chom a ra an U.D.B. war dachenn an dibabadurioù politikel gall, ken e kredfed a-walc'h ez eo an U.D.B. un dedaoladur hepmuiken eus ar P.S.U. gall dre vras. War daou boent ez eo anat an dra-se dreist-holl. Enep-atlantek ez eo an U.D.B., enep-amerikan dre vras (ne fell ket din lavarout e tleer stlakañ an daouarn ouzh kement a ra an Amerikaned evel just : peseurt keñver a zo a-hend-all etre ar vro a 3 000 000 a dud a fell deomp adsevel hag an impalaeriezh a 200 000 000 a dud a zo en tu all d'an Atlantel ? Hogen kasaus eo e ve prest an U.D.B. evel ar P.S.U. da zamantiñ bepred hag hep mank d'ar Rusianed ha d'ar broioù komunour dre vras, ha da gondaoniñ bepred ha ken buan all an Amerikaned. War ur poent all e kemer paotred an U.D.B. un emzalc'h politikel gall; hini al likouriezh, a gredan, a chom un emzalc'h a zisfiz e-keñver an Iliz.

Un nebeut prederiadennoù a c'heller ober diwar-benn kement-se. Da gentañ e kavomp amañ an abeg a ziskleir perak n'eo ket adunanaet stourmerion ar M.O.B. hag an U.D.B. Ar re gentañ a chom 'atlantek', e-giz ma lavarer, ha n'int ket chalet gant 'mac'homerezh' an Iliz. Hep kontañ evel just pezh am eus meneged end-eeun : enebiezh etre ar personelezhioù.

o

Peogwir emañ ganti, koulz eo burutellañ unan eus gwanderioù all an D.D.B. : lec'h ar gristenion en un urzhiadur a c'hell bezañ degaset evit bezañ reizhpoc'h gantañ e-unan da ober deiz pe zeiz dibaboù politikel a yafe a-enep da gendrec'hadurioù relijiel darn eus e renerion diouzh m'o defe o miret a-hend-all.

Dre vras ne c'hell bezañ emzalc'h ar c'hristenion en un urzhiadur a hengoun lik gall, evel ma'z eo hini an U.D.B. ganet diwar ar P.S.U. gall, nemet un emzalc'h gwan, dreist-holl en endro kempennour a zo hini an U.D.B. end-eeun.

Ar gristenion "a-gleiz" e Bro-C'hall⁽¹⁾ koula hag e Breizh a zo en un emgav start-tre. Ur bihanniver ez int ken e-touez ar gristenion o-unan ken e-touez ar gomunourion. Evit ober berzh ha kas o mennadoù da benn e tlefeñt gonit an holl gristenion d'o mennadoù. Hogen kement-se a zo dic'hallus dre 'n arbenn a orin kevredigezhel an darn vuiañ eus ar gristenion a hiziv. Ma chomont o-unan-penn avat e seblanto o folitikerezh bezañ unan a eneberezh seven ha dibloustrek a-grenn, heñvel a-walc'h ouzh hini ar vroadelourion e Breizh er mare-mañ. Kavout a reont 'eta e fedusoc'h peurvuiañ bale mui pe vuï war ur renk gant ar gomunourion, ar re nemeto er gostezenn gleiz o deus nerzh hag urzh un tamm bennek, ha kleizourion digristen all. Hogen ne vint biken stank a-walc'h evit levezonañ ar re-se, en abeg d'o niver dister dres. Neuze ez eo da ganto bezañ aze, hepmuiken, da reiñ un testeni e-giz ma lavaront ha gortoz sevenidigezh o uhelvennad kevredigezhel ha dreistvuhez o relijion diouzh youlvat o c'hevredidi - a zo ivez o mistri - ha gras Doue moarvat. O menoz eo, sur a-walc'h, ne c'heller ledañ ur wir gristeniezh nemet en ur gevredigezh reizh ha glan. Skarzhañ breinadurezh ar gopitalouriezh a ranker ober da gentañ. Ha neuze e vo tu da soñjal er speredelezh.

Moarvat, Sant Tomaz n'en doa ket lavarout gwell. Hogen evit se e vefe ret d'ar gristenion-se, da vihanañ, c'hoantaat bezañ mistri. Ha ne reont ket, pell emañ zoken. Ar gevredigezh "reizh ha glan", evel m'hec'h empenont ne vo ket savet ganto, gant ar gomunourion ne lavaran ket. Hag ar gevredigezh-se a vo ivez denal ha skiantel rik, prometead hag enep-doueat, diazezet war lorc'h ar renerion-stad evel m'henn diskouez emroadur U.R.S.S. end-eeun.

(1) Ur c'hoarvezadenn gall-latin ez eo an arakaouriezh kristen. N'her c'haver ket er broioù saoz hag hanternoz.

Seurt kevredigezh ne c'hell ket bezañ degemeret gant ur c'hristen. Ne lavaran ket e vo skarzhet a-grenn ar gredenn gristen en ur gevredigezh komunour. Er gwellañ degouezh avat ne vo gouzafivet nemet evel un albac'henn hiniennel, miret d'un nebeudig a spered-eion pe a vezourion, evit o dudi-int. Pellaet e vo ar c'hontamm diouzh ar bobl. Setu da vihanañ pezh a c'heller krediñ a-walc'h.

Hogen emzalc'h ar c'hristen a-gleiz e-giz m'en kaver e Bro-C'hall hag er broioù latin n'eo ket gwan hepken en abeg d'ar c'heñverioù a nerzh, en abeg da dro-spered ar c'hristen a-gleiz end-esun ne lavaran ket. Bez' ez eo an diviz etre ar Marksour hag ar C'hristen, evel m'eo intentet bremañ, netra nemet an diviz etre ar mestr hag ar sklav, etre an tamaller hag an tamallad, etre an tad hag ar bugel. Kristen emskiantek ebet ne c'hell en degemer. Diskleriañ a rin va soñj.

Emzalc'h ar c'hristen a-gleiz er broioù latin a zo un emzalc'h buhezel da gentañ, gwirizennet dres en ur vuhezouriezh nac'het gant ar gomunourion. Fellout a ra dezhañ lakaat an arboellerezh e servij mad an den, mad pep hini. Ur puritan, ur glanvuhezour ez eo ar c'hristen a-gleiz hag ampart a-walc'h eo ar c'homunour evit tennañ e vad diouzh e goustiañs fall evit e chadennañ ha lemel digentañ pep intrudu war dachenn ar politikerezh.

E gwirionez ez eo diazezet ar c'henlabour etre komunourion ha kristenion war un treuzemglev. Ar gristenion a zeu d'ar sokialouriezh henn gra evit abegoù a reizhdad, a zoujañs evit an den, a garantez evit an den hag evit Doue, mestr ar Reizhdad. Ar gomunourion avat ne welont er sokialouriezh nemet un tu da diazezañ ur bed hag un Den nevez, deuet da vezañ mestr an Natur, e-giz m'o intentont. Ne stourmont ket evit an den, evit Mab-den ne lavaran ket. Marks hag eñ bourc'hiz n'en doa bet darempred gwirion ebet gant ar werin, dreist-holl gant hini ar maezioù. E brederouriezh n'he deus netra da welout gant ar garantez evit ar bobl; gwelet en deus er Geizh ur benveg da seveniñ e vennadoù ha dreist-holl da grouiñ ur bed poellek ha sikiantel ha n'eo ket, da gentañ, un tu da harpañ e vrezdeur. Moarvat en deus sikouret anezho; hogen hep mennout dezhañ ha dre zegouezh nemetken. E nep keñver ne oa anezhañ un den a drivli.

o

Petra a fell din dezastum eus kement am eus displeget a-ziagent ? An dra-mañ dreist-holl. Ma fell d'ar gristenion e ve sevenet en diwezh o uhelvennad - hag an dra-se a rankout hetiñ maz int reizhpoell ganto o-unan - eo ret dezho mirout a-grenn o frankiz hag o intrudu. Pal politikel ar c'hristen evel kristen ne c'hell bezañ nemet diazezañ ur gevredigezh a rofe tu d'an talvoudoù kristen da vleuniañ ha da emziorren. Emdouell e vefe avat faltaziañ e c'hellfe an talvoudoù-se kavout o lec'h en ur gevredigezh komunour. Kement a zo c'hoarvezet er broioù deuet d'ar gomunouriezh abaoe derou ar c'hantved -mañ a ziskouezfe ar c'hontrol. Dre vras ne c'hell nep emsav kontañ war ar re all evit seveniñ e uhelvennadoù, hini Breizh evel hini ar gristenion. A-benn ar fin e rank un emsav a fell dezhañ trec'hiñ e gwirionez, krouiñ an darvoudoù e-lec'h gortoz anezho, lakaat ar re all da dermeniñ o emzalc'h en e geñver-eñ e-lec'h termeniñ e emzalc'h-eñ e-keñver hini ar re all. En em gemmeskañ a ra avat e intrudu hag e frankiz gant an dispac'h hag ar reveulzi o-unan.

Mirout ar frankiz hag intrudu ne dalv ket bezañ a-enep d'ar strollad-mañ-strollad pe d'an emsav-mañ-emsav hogen empennañ un dispac'h dalc'hleun a-walc'h evit seveniñ kement a zo talvoudus ha gwirvoudel en emsavioù all.

o

Klask a rin displegañ bremañ perak ez eo faziet ar re a c'hortoz ur wellaenn bennak da stad Breizh digant emdroadur ar stad gall war-du ar gleizouriezh. Faziet int dre ma n'eo ket gwirheñvel e c'hellfed diazezañ ur gouarnerezh kleizet war-lerc'h ma vo kouezhet ar gouarnerezh gaolat.

Da gentañ ez eo koazhet kalz gred ar stourmerion gomunour. En ur gevredigezh a gerzh buan war-du ar "welfare", an hoal-vat amerikan, war-du ar gevredigezh founnus n'eo ket ken anat an diforc'h hag an enebiezh etre renkadoù. Moarvat e chom ar galloud hag ar veli wirion gant renkadoù 'zo a dud a arc'hant hag a uhelgalvezourion. Hogen kuzh e chom ar veli-se. Gent emledidigezh an deskadurezh e-touez holl renkadoù ar gevredigezh - 300 000 bachelour hevlene - ez eus diwanet hag e kresko muioc'h-mui renkadoù tredeek a vo didizhus dre natur da vennadoù ar gomunourion. Ar gevredigezh europat a gemer tamm ha tamm stuz ar gevredigezh

youenn olier

amerikan, ha dre se emañ war var da vezañ didizhusaet' ouzh ar gelennadurezh komunour.

A-hend-all, gouarnerezh komunour ebet n'eo bet diazezet dre al lezenn hag an dilemmadegoù en Europa, evit un abeg anat dispac'hel e fell d'ar strolladoù komunour bezañ, distrujañ galloud ar renkadoù bourc'hiz a-vremañ, diazezañ renkadoù trec'h nevez. Re c'halloudus eo avat en Europa ar c'hornog renkadoù ar vourc'hizion evit asantiñ da vezañ diberc'hennet ha dizornet dre gaer pe dre heg hep herzel. Un trec'h komunour a dremen dre un dispac'h kriz.

Hogen dres ez eo dic'hallus an dispac'h-se dre ma ne asanto an Amerikaned biken e ve savet ur stad komunour bennak e kornog Europa. Gwelet hon eus penaos int etredeuet gant nerzh er Republik Dominikat, el Liban gwechall, er Vietnam bremañ. Barn a c'heller emell an Amerikaned en aferioù diabarzh ar re all, dreist-holl er Vietnam, hogen bez' ez eus anezhi ur fed e raker derc'hel kont anezhañ.

Goanagiñ un trec'h komunour - en ur brezel diabarzh holl gleisi a gouezh diouzhtu dinden beli ar gomunourion - a zo ur fazi. Ar renkadoù etre a yafe a-du gant ar vourc'hizion dre ma'z int gonezet dija d'ar sevenadur amerikan. Hag evel ma'z eo ledan kenañ ha galloudus bras adal bremañ ar c'hendereoù etreat en Europa ar C'hornog koulz hag e Bro-C'hall ez eo gwirheñvel ne c'hellfe trec'h ar gomunourion bezañ sevenet nemet gant harp ar Rusianed. Kement-se avat a zo dreistfaltazi rek asantet o deus ar Rusianed d'ar c'hempouez bedel a zo o ren bremañ ha n'eo em lakaint biken war var da lakaat ur brezel atomel da darzhañ evit sikour ar gomunourion c'hall.

Gwir eo e c'hellfe kleiziz c'hall tapout un tammig muiañ-niver ma vefent holl unanet. Hogen evel ma fell d'ar strollad komunour gall mirout e zishualded hag e zanvez mestroni en amzer-da-zont e chom an unaniezh-se evit ar poent war dachenn an huñvreoù. Ha lakaomp e teufe da wir seurt unaniezh e chomfe ar gevrediezh-se ken dizunvan ha ken bresk ha ken gwan, divelli ha ma vefe, ma ne c'hellfe c'hoari roll a-bouez ebet.

Erfin, lakaomp e ve savet ur gouarnerezh kleizad kempenn-

gar e Paris. E-giz m'em eus merket endeo, ne vije ket Breizh deuet gwelloc'h dezhañ, rak er c'henarroud kevredigezhel m'eo degouezhet Breizh e kendalc'ho da vouezhiañ a-zehou pe a-etre evel a-gent ha disfizout a rafe gouarnamant Paris diouzh Breizh muioc'h eget a-raok c'hoazh.

Ha ma vefe ur gouarnamant sokialour dispac'hel e vefe gwashoc'h c'hoazh rak Breizh a vefe sellet evel enebourez.

Evit pezh a sell ouzh gonit kleiziz Vreizh d'ar menozioù breizhek gant an U.D.B. ne lavaran ket ez eo diboell a-grenn ar menoz-se hogen seurt mennad, a gredan, a zo evelato a eilpouez. E-touez ar re ha n'o deus graet politikerezh gall ebet eo e vo tutaet ar stourmerion a zaskoro da Vreizh he rezid. En holl vroioù a zo bet disubet ez eo c'hoarvezet kemend-all hag hini ebet, da skouer, eus ar strolladoù savet dindan gouarnerezh Vichi n'eo dreistvevet e 1944. Sellit ouzh Aljeria ivez.

Ne gev ket din e c'hell an emsav en em harpañ war ur c'hen-degouezh politikel gall rik. Ar gwirheñvelañ - ha sed pezh a zo da hetañ - eo e vo enlec'hiet ar gouarnerezh gaolat a hiziv gant ur gouarnerezh etreat hag europat. Gwirheñvel eo e c'hoarvezo an dra-se, - ma ne c'hoarvez gwallverzh politikel e-giz ur brezel etre Reter ha Kornog pe un enkadenn armerzhel a seurt gant hini 1929, h.a. - a adlavaran, rak an impalaerelouriezh c'hall a hiziv n'he deus mui diazez gwirion ebet; n'eus anezhi nemet seblant. A-hend-all o deus kollet renerion ar c'hostezennoù kleiz koulz ha re ar gostezenn dehou o youl dispac'hel, ha ne gredan ket e arnodint kemer ar galloud dre heg en deiz ma varvo D.G. Nag ar gostezenn dehou nag ar gostezenn gleiz ne hetont mui un aprou a nerzh ha gwell a se ez eo, rak beuzet e vefe Breizh en ur reveulzi estren adarre.

Klozomp an ensell-tro-mañ.

Ret eo deomp kompren ned eo ket ur pal politikel ordinal an hini a vukomp; bez e c'hell ar bolitikerion c'hall gortoz hag amzeriñ; darn eus o goulennoù a c'hellont gwallegañ; kalz

anezho a zo bet sevenet; nag o yezh nag o sevenadur nag o frankiz e stern Europa zoken - ha ne vo biken ur vroadelezh - n'emaint en arvar. N'eo ket heñvel ar gont e Breizh siwazh. War-nes mont da get ha da vat ez eo hor yezh, hor vroadelezh, hag hor sevenadur ha netra, siwazh, ne ro deomp da grediñ e vo profet ar frankiz dre gaer da Vreizh.

Rak-se eta e rankomp empennañ ha kas da benn ur politik-erezh disheñvel krenn diouzh an hini a c'hell kaout ar bolitikerion c'hall. Na c'hortozomp un amzer-da-zont graet gant re all, hogen greomp anezhi hon-unan.

Adal bremañ eta e tle an emsaverion prederiañ diwar-benn ar c'hudennoù o devo da zirouestlañ e stern ur stad broadel, empennañ diazezoù speredel ha pleustrek ar stad-se evit gellout diogeliñ da vat bezoud o bro ha dreistvuhez o yezh hag o sevenadur. Pred ar preder ez eo bremañ a-rak ma teuy pred ar stourm.

o

Notenn

Ne ensellan ket ar gudenn hec'h-unan eus ur sokialouriezh azasaet ouzh stuz Breizh, o terc'hel kont eus pouez al labourerion-douar dieub en hor bro, hogen hini an darempredoù speredel ha politikel a c'hell kaout Breizhiz - kar-o-bro - gant menozialegoù ha strolladoù estren.

Ne anzavo ket aes, evel just, ar c'hristen a-gleiz gall-latin ez eo buhezel ha trivliadel e gleizouriezh. D'am soñj n'eus ket da gacout mezh gant se. Ret eo ouzhpennañ en em lak ar c'hristen en un emgav diode o tegemer savboent skiantel ha danvezel Marks. An elfenn nemeti a zo talvoudus en oberenn Varks hag a c'hell bezañ implijet ez eo e zielefnadur eus ar gevredigezh kevalour. Hogen emañ an dielfennadur-se en ur c'henarroud danvezelour ha na c'hell-sñ ket bezañ degemeret. An arvar a zo o resev beli Varks ez eo evel just dont da resev ivez tamm ha tamm e holl savboentoù gwitibunan, ha chom dizifenn dirak arguadurioù e gevredidi a zo ivez, e-giz m'em eus merket, e vistri.

Ar c'hudennoù-se a-hend-all am eus meret - pe zamveret atav - e-barzh ar studiademn all "Renkad ha bro".

ooo

T A O L E N N

Digoradur	3
ABANNA	
Amplegadoù ur Gelelnadurezh Folitikel	7
YOUENN OLIER	
Gouenn, Renkad ha Sevenadur	13
YOUENN OLIER	
Renkad ha Fobl	29
HERVE AR ME	
A-zivout Dispac'h Kuba	41
LOEIZ LEMOINE	
Mary Sokrates	47
ABANNA	
Ur Brederouriezh Vroadel	53
ABANNA	
Keal ar Gwirvoud en Emsav	57
YOUENN OLIER	
Petra eo al labour vallusañ ?	69

)o((

